


JAKIG KERGIDU

EMGANN KERGIDU

hag

AN TENNEREZ D'AR ZORT E KASTEL



MONTROULEZ

MOULLEREZ A. LAJAT, RU AR FEUNTEUNIOU

1914

4B
891.
682
CAL

10726

abb. j. calv. in.


89A
562

EMGANN

KERGIDU

Hag an tennerez d'ar zort e Kastel

E PEMP ARVEST



EMGANN KERGIDU

Nihil obstat :

L. ROPARS

Can., censor

20 Januarii 1914.


IMPRIMATUR :

Corisopiti, die 21 Januarii 1914.

A. COGNEAU,

v. g.

KENT-SKRID



AR WIRIONEZ TREAC'H D'AR GAOU



Piou n'en deuz klevet komz euz Potred ar Vende ? Brudet hint e peb leac'h, dre m'o deuz difennet ho feiz, ho ilizou, ho roue gant kement a galon. — Hag hon tud koz, evit piou o deuz stourmet gant kement a himor ? Evit piou o deuz skuillet ho goad e Plabennec, e Lesneven, e Kastel, ha dreist-oll e traonien Kergidu (Plougoulm) ? Evit Doue, ho zud, ho bro... Anaout a ran goulskoude skriva-nerien hag o deuz kredet lavaret : « Potred Leon, ha meur a Dregeriad soken, a en em zavas a eneb soudardet ar C'houarnamant, ne ket evit difenn ho religion oa avad, mes ne felle ket dezho mont da zoudardet ; aoun o doa araog ar zervich. » Eur pezh gaou kement-se. Klevit petra lavare ar re iaouank : « Ni a ve laouen o vont da zoudardet, ia, ma vemp kaset da zifenn ar Frans ouz he enebou-rien ; ne ket avad da laerez ha da laza tud ar vro eo. » E guirionez, m'o divije bet aoun araog ar zervich, ar boan, ar maro, evel m'o deuz c'hoant lod da rei da gredi, daoust hag e vichent eat da en em ganna gant bicher ha freier a eneb kanoliou, fuzulliou ha baïonnettez ar revolutionerien ?

Evelse 'ta, evit derc'hel ar feiz, ar peoc'h, al lealdet er vro eo o deuz hon tud koz, goazed, kennar-
det, ha merc'hed zoken, stourmet gant kement a

galon a eneb dispac'herien Canclaux. Henor dezho!!

Evit ma c'hanavezo quelloc'h va c'henvroiz feiz birvidik hon tud koz, ha m'o devezo kalon da gerzat var ho roudou ma vez red, eo falvezet ganen displega e pemp arvest eul lodenik euz an traou skrijuz a reaz, potred an dispac'h en hor bro. — Ar piess-ma em euz tennet euz leoriou an aotrou Levot, an aotrou Tanguy, persoun Plougoulm, an aotrou Peyron, chaloni... Peb tra ennhi a zo guir, nemed marteze eur gountaden benag tennet euz « Emgann Kergidu » an aorou Inizi. Ne vezo ket diez da zisplega, dre ma c'heller he c'hoari gant kals, evel gant neubeud — pe guir ar memes hini a c'hell ober meur a roll. Evelse roll Oulier ha Jakez a dlefe beza great gant unan hebken. Evel c'hoaz roll Biel ha Paol Keraëret er pemped arvest.

D'ar missioner en deuz great kement a vad en eskobti dre he brezegennou dispar, d'an aotrou Duc, chaloni e Kemper, eo e kinnigan ar piess-ma. D'ar Plougoulmad guiziege-ze, karet gant an oll, e tis-kuezis da genta va zantig labour, araog ma oa zoken peur-echu. An aotrou Duc, ken dirok e kenver an dud dister, a gennerzaz ac'hanon dre al lizer a gafot aman varlerc'h.

An aotrou Gall, persoun kanton Taole, oberour al « Leor ofern » ha kals skridou all euz ar re gaera, en deuz kastizet an doare-skriva. Bennoz Doue, aotrou meuluz, a lavaran deoc'h a greiz kaloun.

Fizians em euz eta, va c'henvroiz ker, e plijo deoc'h va zantig labour, hag e lakei da greski en ho kaloun ho karantez evit hon Doue, hor bro hag hon tud-koz.

JAKIG KERIDU

Plougoulm, 20 a viz genver 1914.

Quimper, le 20 Novembre 1913.

MON CHER AMI,

Votre drame intitulé « *Emgann Kergidu* » est une bonne action, et au nom des Plougoulmiens dont j'ai l'honneur d'être un des doyens, je vous remercie. Cette pièce bien jouée est appelée à faire du bien : le but que vous avez voulu atteindre ; vous l'avez atteint : percer à jour le mensonge historique qui consistait à vouloir attribuer à la lâcheté et à l'oubli du devoir l'attitude des léonards, en face des horreurs de la révolution, et de ses lois injustes et persécutrices.

L'épisode de Kergidu et le soulèvement de la Vendée ont eu le même mobile.

En souhaitant bon succès à votre pièce, je vous prie de croire à mes sentiments cordialement dévoués.

LE DUC,

Chanoine.



Emgann Kergidu

Hag an tennerez d'ar zort e Kastel

E P E M P A R V E S T

*An arvest kenta a dremen e kambr an Aotrou de Kermenguy,
e Kastel.*

(Eun daol, eur fauteuil, 2 pe 3 gador, eur c'hrist, eur
prie-Dieu, etc., eur c'hloc'hik evit gervel.

C'hoarierien :

AN AOTROU DE KERMENGUY, *Tad.*

AN AOTROU DE KERMENGUY, *Mab.*

LAOUIK.

AR MEVEL.

DAOU ARCHER.

ARVEST KENTA

*An Aotrou de Kermenguy tad, a c'halv ar mevel.
Laouik ! Laouik !... Ne gleo ket ac'hanon. (En
eur c'helver krenvoc'h, hag o seni ar c'hloc'hik).
Laouik ! Laouik !*

LAOUIK

*(Laouik a deu d'ar red). Va Mestr en deuz va
galvet ?*

AN AOTROU DE KERMENGUY

Ia, Laouik. Va mab, an aotrou Loiz zo er gear ?

LAOUIK

An aotrou Loiz zo en he gambr a gredan, va Mestr.

AN AOTROU DE KERMENGUY

Lavarit d'ezhan dont d'am c'haout dioc'htu.

LAOUIK

Entetet eo Mestr. (*Laouik a ia kuit en eur zaludi*).

(*An Aotrou de Kermenguy a ia d'an daoulin var eur prie-Dieu, hag a ra ar beden-man gant kalon*).

Va Doue, n'o peuz roet din nemed eur mab. Hen eo baz va c'hosni hag henor va bleo guen. Anaout a rit va c'harantez birvidik evithan. Goulskoude na me a ve laouen, ma karfe va mab riskla he vuez fenoz evit savetei an hini a zalc'h ho plas en hon touez. Selaouit va feden, ô Jezuz, ha roit feiz ha kaloun krenv d'am mab ! »

(*Ar mab a sko var an ôr*).

AN TAD

Deuz ebarz.

(*Ar mab en eur zont tre*).

AR MAB

Doue ho pennigo va zad.

AN TAD

(*Heb sellet ha trist meurbed*). Bennoz Doue d'id va mab.

(*Chom a reont eun neubeud heb kaozeal*).

AR MAB

Me gred o peuz va galvet va zad ?

AN TAD

(*En eur huanadi*). Ia, va mab, ia da c'halvet em euz.

AR MAB

Ha petra zo a nevez 'ta, va zad ?

AN TAD

Ha ! petra zo a nevez ! ! !... Ha kaloun e peuz, va mab ?

AR MAB

Ha kaloun em euz ? (*a gostez*) petra zo a nevez da vihana ! (*krenv*) me gav din va zad em euz kaloun ! ha n'em euz ket aoun araog va skeud m'her goarant d'eoc'h.

AN TAD

Ba !... Ar re iaouank zo oll evelse. Var ho meno n'o deuz aoun araok n'etra ; ha kerkent a ma velont an distera riskl dirag ho daoulagad e krenont evel deliou.

AR MAB

Va zad : gouzout a rit ar respet a m'euz evidoc'h ; goulskoude, glazet ho peuz ac'hanon : ne vije ket brao d'eun all kaozeal ouzin en doare-ze. Krena ! Me !... dirag an danjer ? Neuze 'ta n'oun ket mab d'an aotrou Kermenguy ? Ne gaf ket din goulskoude beza trec'het ouen : goad tud chentil Kermenguy ne ket troed e dour ?

AN TAD

Kals plijadur em euz ouz da glevet o komz gant kement a galoun, va mab.

AR MAB

Perak 'ta neuze e choumit keit-se araok kaozeal didroidel d'in ?

AN TAD

(*En eur zellet ouz he vab, hag o poueza var bep ger*). Abalamour ar pezh em euz da ginnig d'id hirio zo eun dra rust meurbed.

AR MAB

(*Gant her*). Komzit freaz va zad, n'euz forzh pegen rust eo, great e vezo.

AN TAD

Tosta ouzin neuze va mab ker, ha selaou mad ar pezh ez an da lavaret d'id : Ma c'houlafen diganez rei da vuez fenez, ne ket varc'hoaz eo avad, mes fenez ! Ma c'houlafen diganez eta rei da vuez fenez evit da Zoue, da Feiz ha da vro, hen ober a rafez ?

AR MAB

(*A gostez*). Va buhez ? Oh ! (*o kregi he dourn he dad gant herder*). Ia, va zad, hen ober a rafen a galoun vad. Ha ma n'her grafen ket ne vijen ket din da zougen hoc'h hano.

AN TAD

Tridal a ra va c'haloun ouz da glevet va mab ker, Doue ra vezo meulet !

AR MAB

Komzit freaz va zad. Rak mall eo ganen gouzout petra dlean da ober fenez.

AN TAD

Mad, va mab keaz, setu aman petra em euz da

ginnig d'id. O tont euz a di an Aotrou de Poulpiquet emañ.

AR MAB

Ha neuze ?

AN TAD

Gouzout a rez eman breman an Aotrou de la Marche, hon eskop karet, kuzet e maner ar Gernevez ?

AR MAB

Her gouzout a ran, va zad.

AN TAD

Mes allaz, mall eo d'ezhan tec'het ac'hano ive ; rak an archerien ne baouezont da furchal an tiez e kear ha var ar meaz. Redet ha diredet a reont evel chass bounnaret.

AR MAB

Kement-se avad zo re vir, siouaz ! Er mintinman em euz gullet nao pe zek anezho o vont d'an daoulam-ruz var hent Berven, 5 pe 6 all var hent Ploueskat.

AN TAD

Eur gounnar zo enno abalamour n'o deuz ket gullet tizout an Aotrou de la Marche en he Eskopti... Selaou mad ar pezh ez an da lavaret d'id : Gouzout a rez ez euz e Rosko listri bian hag a ra froderez, etre ar Franz ha Bro-Zaoz ?

AR MAB

Ia, pell-zo e c'houezan an dra-ze.

AN TAD

Mad, An Aotrou 'n Eskob, an Aotrou de Poulpi-

quet ha me a zo en em ententet gant eur vag frode-
rez a zo hirio e tal santez Barba e Rosko, hag a
dle mont da Vro-Zaoz, ha kass ganthi an Aotrou 'n
Eskob.

AR MAB

Mes, va zad, perak mont keit-se ? Perak mont
da Borz-ar-Bescond-Rosko ? Ne ket bagou a vank
e Bempoul, ha gouzout a ran e vent laoden o renla
servich d'an Aotrou 'n Eskob. En em glevomp gant
unan anezho. Evelse an Aotrou 'n Eskob a vezo
neubeutoc'h a riskl evithan da goueza etre daouarn
an archerien.

AN TAD

(*En eur vouse'hoarzin*). Ah ! va mab ker, fazia
a rez. Ni ive on doa sonjet evel dout. Mes pao-
tred ar c'houarnamant a daol evez var bep tra.
Kaset o deuz da gichen Kastel an Taro eur « va-
timant » hanvet ar *Sans Pitié*, evit mont varlerc'h
al listri a velont o vont varzu Bro-Zaoz, ha guele-
t piou zo enno. Ma viche guelel eta, diouz ar mintin,
eat kuit bag unan benag euz a Bempoul epad an
noz, kerkent e vije kaset kelou d'ar *Sans-Pitié* da
vont varlerc'h ar vag vian, ha buan e vije tizet.

AR MAB

Ah, possubl e vije avad ; me ne m'oa ket sonjet
e kement se.

AN TAD

En em glevet on deuz eta gant eur vagik vian
euz a Rosko. Mes, va Mab ker, kompren a rez ne
c'hell ket an Aotrou 'n Eskob mont he unan euz ar
Gernevez da Rosko ?

AR MAB

O nan avad !

AN TAD

Ne c'heller ket ken neubeut fiziout e kement
hini a zo mont gant an Aotrou 'n Eskob.

AR MAB

Ken neubeud all avad. Rak an dud treitour zo
niveruz dija en hor bro.

AN TAD

(*O sellet piz ouz he vab*). Piou a gav d'id eta a
vije kavet da hentcha an Aotrou 'n Eskob d'ar vag ?

AR MAB

(*Gant kaloun*). Piou ?... Me, va zad ! Me eo a
ielo ember da gerc'hat an Aotrou 'n Eskob d'ar Ger-
nevez ha d'her c'has beteg ar vag, pe a varvo en
hent evit hen difen, ma kouez varnomp an dispac'he-
rien !!!

AN TAD

O ! va mab, va mab muia karet, deuz ma
stardin ac'hanout var boul va c'haloun... Komz a
rez aze, va mab ker, ne ket hebken evel eun den
a galoun, mes evel eur guir zoudard da Jesus-Christ.
Ma tigouez d'it koueza etre daouarn ar zoudarded,
marteze siouaz ! n'en em velimp mui var an tam
douar-man. Ne jommo den ganen d'am harpa em
c'hosni, da zerra din va daoulagad. Mes, va Mab
muia karet, ar sonj euz da varo gloriuz, ar sonj
em bezo roet eur merzer d'ar baradoz, em
c'henerzo em foaniou, em ankeniou. Ne oufe ket
e guirionez ober eun dra kaeroc'h. Rak oc'h
ober ar pezh a ri fenoz, e tifenni da Zoue ha da

Feiz, dre ma fioualli ouz peb drouk eun Eskob hag a zalc'h plas Jezuz-Krist he unan er c'horn douarman. Difen a ri ive da vro, en eur viret outhan da ruzia he zaouarn gant goad eun den konsakret da Zoue ; eun den hag en deuz great kement a vad e bro Kastel, maget kement a beorien, sec'het kement a zaelou. Ia, bennoz d'id va Mab, ha... Doue ra vezo ganez !!!

AR MAB

Neuze va zad e c'hellan mont dioc'htu da lemma va c'hleze ha da garga va fistolen, abenn ember ?

AN TAD

Ia, ia, pa giri va mab... Ah ! eur ger c'hoaz : goulskoude. An Aotrou 'n Eskob a gaso nemeur a dra ganthan ; eun draik bennag a vezo goulskoude ; ha setu perak em euz sonj lavaret d'hor mevel koz, Job ar Postic, mont ganez ive. Job evel a c'houzout, zo eun den a zoujans Doue, ha n'hor guerzo biken... Ah ! va mab karet, poan e pezo, ha da c'hoad mar-teze a ruillo, mes... Doue as paeo !

AR MAB

Va zad, me anavez eun den iaouank fur ha leal hag oun sur a deufe fenez ganeomp ive, mar d'oc'h aviz.

AN TAD

Ne c'houlennan ket guelloc'h a c'hellez kredi, da vihana ma c'heller kaout fisianz ennhan.

AR MAB

Oh ia, ia, bezit dizoursi var ar poent-se va zad.

AN TAD

Mad eo neuze. Rak ma vec'h taget e vezoc'h da

vihana unan muioc'h evit difen an Eskob santel. Mes piou eo an den kalouzek-se 'ta, va mab ?

AR MAB

An Aotrou de Kertanguy euz a goatud avel (Messaol).

AN TAD

Mad tre, mad tre. Mes kea dioustu neuze d'he gaout. Rak (*o sellet ouz he vountr*) eman teir heur, hag aben seiz heur e rankit beza e maner ar Gernevez. Me a ia ive raktal da lavaret d'an Aotrou de la Marche em euz kavet tud a galon d'he hentcha hag e c'hell beza dinec'h.

AR MAB

Ia, ia, lavarit d'an Aotrou 'n Eskob ec'h en em gavo fenez e Rosko pe... ni a varvo!!! Kenavo ember, va zad ker !

AN TAD

Kenavo, va mab muia karet ! Ha Doue d'az tiouallo diouz peb darvoud ! (*P'edont o vont da bokat an eil d'egile, e klever kaozeal er porz hag ar mevel a zired er gambr*).

AR MEVEL

Va Mestr ker, aman 'zeuz digouezet eur vanden archerien ! Sellit, emaint erru er gambr. (*Ar mevel a ia kuit d'ar red*).

AN ARCHER

(*Da vestr an ti*). Peleac'h eman ar sitoyan La Marche ?

AN TAD

Ar sitoyan La Marche ? Piou hennez ?

AN ARCHER

Ann hini a ioa eskob ganeoc'h e Kastel.

AR MAB

(*Gant herder*). Euz an Aotrou (de la Marche, hon Eskob santel, eo e kaozit ken direspel ? Mille nonde non ! ! !

AN ARCHER

N'eo mui eskob. Ar c'houarnamant en deuz ten-net he eskopti diganthan, ha torret anezhan euz a eskob.

AN TAD

O ! mar plij aotrou ! Eskob eo hag eskob e chommo en despet d'ar c'houarnamant ha d'he lezen-nou sakrilach !

AN ARCHER

(*Droug braz ennhan, en eur gregi eun neubeud en Aotrou de Kermenguy*). Petra livirit euz al le-zennou ? D'ar prizoun !

AR MAB

(*En eur lamet da zifen he dad*). Ne lakit ket an dourn var va zad.

AN ARCHER

(*A gemer he bistolen hag a vrak anezhi dirak penn ar Mab*). Chom sioul, pe me a frigasso did da benn ! (*An archer all a lam ive d'ar mab*).

AN TAD

(*En eur lakat goustadik an archerien da ziskregi euz he vab*). Mes lezit ho storlok c'hui ive, ha se-laouit mestr an ti.

AN ARCHER

Mestr an ti ? Me eo ar mestr aman. Droat em euz da velet piou ha petra zo ennhan, hag hen ober a rin !

AN TAD

Oh ! mar deo evelse eman breman an fraou e Frans ! Ma n'eo mui mestr ar perc'hen d'he dra, nag en he di ; oh neuze avad grit ar seurt a gerot : laerit, lac'hit ac'hanomp mar kirit zoken, rak en eun amzer evel houman eo guelloc'h beza maro eged beza beo.

AN ARCHER

(*Deuet ennhan he unan*). Ha petra o poa da lavaret neuze ?

AN TAD

Lavaret eta ne c'hell na Roue, nag Impalaer, na den, lemmel he garg digant eun Eskob. An T. S. ar Pab hebken en deuz ar c'halloud da ober kementse.

AN ARCHER

Alo, alo, ni n'omp ket deuet aman da zelaou sarmouniou ganeoc'hui, storloker koz. Lavarit d'comp buan peleac'h eman ar sitoy... an Eskob neuze mar d'eo guelloc'h ganeoc'h. Peleac'h eman ?

AN TAD

Peleac'h eman, peleac'h eman, en he eskopti, kredabl.

AN ARCHER

(*Var eun tón goapaüz*). Ia, en eskopti... C'hui c'hoar awalc'h n'eman mui eno. Dimeurs, ia, pa oamp

en em gavet edo c'hoaz en eskobti. Mes ni a oue sot awalc'h evit lezel anezhan eur pennad he unan en he gambr ; evit destum eun neubeud dillad da vont ganthan, var he veno, hag epad ma c'hortozemp anezhan e tal he gambr e c'hellaz tec'het kuit dre en or guz a ioa er voger ; hag abaoue kaer on deuz klask-diglask n'her c'havomp e neb leac'h.

AN TAD

Mad, evit aman n'eman ket.

AN ARCHER

N'eman ket aman, n'eman ket aman. E peb ti e respounter evelse deomp. En eun tu benag eman goulskoude.

AN TAD

Meur a hini, evel a c'houezit, o velet an dispac'h a zao er vro, zo eat da glask eun tam bara d'ar broiou all. Marteze an Aotrou 'n Eskob zo tec'het da Vro-Zaoz ?

AN ARCHER

O, amzer, sitoyan. Ni n'oump ket ganet dec'h, Ni on deuz kountet an oll bagou zo e Pempoul. Ha me c'hoarant deoc'h ne finvo hini anezho heb na c'hoesfemp-ni.

AN TAD

Mad, eur vech c'hoaz, evit aman n'eman ket... là.

AN ARCHER

O ! Kement-se zo eaz da lavaret. (*D'an archer all*). Sitoyan, furch ar gambr-man. Ha taol evez-mad avad na ve eun or guz benag er voger. (*An archer all a furch dre ar gambr*).

AN ARCHER

(*D'an Tad*). Kendalc'her a rit da lavaret n'eman ket ar sitoyan eskob aman ?

AN TAD

Ia, ia, lavaret a ran deoc'h n'eman ket an Aotrou 'n Eskob aman.

AN ARCHER

Goaz aze evidoc'h, pe guir e nac'hit. Rak me oar mad eman en ho ti. Selaouit al lizer em euz bet er mintin-man. (*Lenn a ra al lizer*). « Sitoyan, va mignoun, ar sitoyan La Marche n'eman mui e ti ar sitoyanez du Laz. Breman e tle beza e koajou ar Gernevez pe kentoc'h e maner ar sitoyan Kermenguy. Klaskit mad eno. D'ar maro ar veleien hag ar re a ro digemer dezho ». Guelet a rit ? Ni on deuz kamaradet dre aman hag a gelen mad ac'hanomp.

AR MAB

O ia, gouzout a ran e zeuz meur a Judas ive e louez hor c'henvroiz.

AN ARCHER

(*Gant rustet, en eur denna he gleze*). Petra levez te ? fri louz !

(*Drouk braz ennhan, hag o vennout skei ar mab gant he gleze*). Lavar c'hoaz-ta eo Judaset or c'hamaradet-ni ?

AN TAD

Amenit ho koler ! Lavaret a ran deoc'h n'eman ket an Aotrou 'n Eskob aman.

AN ARCHER

Guelet e vezo — (*d'an archer all*). Ne gavez trez ebed anezhan ?

AN EIL ARCHER

Nan, sitoyan brigadier.

AN ARCHER

Deomp d'ar c'hrambou all. Ni a furcho e pebleac'h. Ha ma vez kavet aman — hag e vezo — (*en eur zevel he gleze azioc'h an tad*) ho koad gant he hini a ruillo ! (*An archerien a ia kuit*).

AN TAD

(*Eun neubeudik da c'houde*). Guelet a rez eo mall d'an Aotrou Eskop tec'het.

AR MAB

Ia avad, n'euz ket a amzer da goll. A drugare Doue ne c'hellint ket klask er Gernevez hirio. Kenta ma c'hellin tec'het diouz an archerien e redin da Goatudavel, ha trumma ma c'hellimp ez aimp d'ar Gernevez.

AN TAD

Ia, va Mab, kea kenta ma c'helli, ha Doue ra vezo ganez ! Kerkent a ma vezo eo kuit an dud gouez mañ me ielo ive da vaner ar Gernevez. Rak karout a rafen kaout bennoz an Aotrou 'n Eskob eur vech c'hoaz. — Kea va mab, kea trumma ma c'helli. Me ia da velet petra-ra al lampounded-se en eac'h.

AR MAB

Kenavo emberr neuze, va zad ker.

AN TAD

(*Gant kalon, en eur bokat d'he vab*). Kenavo, va mab muia karet, kenavo emberr, pe kenavo... er baradoz ! ! !





EIL ARVEST

An eil arvest a dremen en eun ti e bourg Plougoulm.

C'hoarierien :

JEROM pe TAD KOZ.

PAOLIK, krouadur, dek pe unek vloaz.

AN AOTROU KURE.

OULIER, 70 vloaz.

PAOLIK

O ! tad koz, petra e meuz klevet ! ! !

TAD KOZ

Petra 'ta, va mabik ? Eun dra drist benag a dra zur, ne glever ken breman.

PAOLIK

Me meuz klevet en deuz ranket an Aotrou-n-Eskob mont kuit euz a Gastel... Ne ket guir, keda tad koz ?

TAD KOZ

Re vir eo siouas !

PAOLIK

Han ! ha me a ioa da veza konfirmet er blaman.

TAD KOZ

Va faotik keaz, ne c'helli ket zoken ober da basq !

PAOLIK

Perak-ta, tad-koz ?... Me oar va c'hategiz dija.

TAD KOZ

O, trida a ra va c'halon o velet pegement e poaniez da zeski da gatekiz. Mont a rez d'ar c'hraou, da draon an ti d'he studia, gant aoun n'en em gafe varnomp ar bleizi kounnaret zo o c'halopat e peb leac'h evit tizout ar re a lavar ho fater. Mes, va mabik keaz, n'euz beleg mad ebet mui en hon touez. An Aotrou persoun a ioa paket eun deiz all gant soudardet an Tunk, p'edo o vont da lavaret he ofern. Sonj e peuz ?

PAOLIK

Sonj ? O ia, sonj mad. Ar vugale a zalc'h sonj, tad koz. Sonj em euz zoken euz ar pezh a lavaraz an Aotrou Persoun er gador, araok kuitad... « Va bugale ger, emezhan, c'hoant a zo da lakat ac'hanon da doui e sentin ouz lezennou faoz-ha diroll : n'her grin biken ; hag alia a ran ac'hanoc'h da ober evel don. Ma ne douan ket e rankin mont gant ar zoudardet emezho... » Ha tout an dud neuze a goummansaz da grial : « Ne deoc'h ket, ne deoc'h ket Aotrou Persoun, ni ho tifenno, ar zoudardet n'int ket ouspen deomp. » — An Aotrou Persoun a lavaraz neuze en eur wuela : « Eur blijadur em euz ouz ha kueledeken niveruz aman, ha prest da skuill ho koad evit va difen. A dra zûr ho plas a vije e touez ar verzerien er baradoz. Rak ne ket evidon-me eo e rofec'h ho puez, mez evit Jezuz-Christ hag he religion. Goulskoude, va bugale ger, ne fell ket d'in e ve lazet hini ac'hanoc'h abalamour din-me. Dre-ze, va bugale, sentit ouzin, evel m'o peuz great atao, ha lezit ar zoudardet d'am c'haz gantho. Lezomp ar barrad goal-amzer da dremen ; abarz

nebeut aman, ma plij gant Doue me a vezo adarre en ho touez. Mont a ran d'ho kuitad, mes evit ankounac'had ac'hanoc'h ne rin biken. Pedit Doue hag Introun-Varia Prat-Coulm evidon, ha kenavo an distro, pe... kenavo er baradoz. »

TAD KOZ

C'hoant guela em euz ouz da glevet va mabig. Rak dalc'het e peuz sonj mad euz an dervez trist-se. Demdost evelse e oa passeet an traou.

PAOLIK

Da c'houde neuze ar zoudardet a grogaz en Aotrou Persoun ; an dud a joumaz sioul, evit senti outhan. Mes oll oat eat betek kroaz Kombot, da gas an Aotrou Persoun ; Mamm ha me zoken, ha kalz re all a ioa bet betek Kastel. An oll dud a wuele hag a lavare : « Kenavo Aotrou Persoun, ha deuit da Blougoulm kenta ma c'hellot. »

TAD KOZ

O dont a rai a dra-zur kenta ma c'hello. Mes allaz, piou a c'hoar abenn peur ! Piou a c'hoar e peleac'h eman breman !

PAOLIK

Marteze e vezo deuet en dro aben pasq, tad-koz.

TAD KOZ

Siouaz ! ne vezo ket deuet zoken aben Pentekost !

PAOLIK

An Aotrou Kure en deuz ranket tec'het ive tad koz ?

TAD KOZ

(*Ne gaozomp ket re grenv gant aoun na ve eur spier benag ouz hor selaou e kichen an or*). An Aotrou Kure zo c'hoaz en hon touez a gav din. Disul en doa lavaret he ofern e Keraeret a glevan. A c'hellez kredi avad n'eman mui he zoudanen ganthan gant aoun en em gafe ar revolutionerien varnhan.

PAOLIK

Penaoz eman neuze ?

TAD KOZ

Avechou, var a glevan e vez guisket eveldomp ; avechou evel al lakipoted a vez aze o klask para-pluiou da zressa ; avichou all e ra an neuze da veza eun divroad (eur gall) o klask kezek da brena. Mes kaer en devezo en em guzat ha chench dillad, abred pe divezad e vezo kavet ma chom dre aman. (*Skei a rear war an or en eur lavaret*) Hè ! n'euz ket a gezek da verza ?

TAD KOZ

Paolik, kea da velet piou zo aze. (*Paolik a ia da gichen an nor*).

AN AOTROU KURE

(*Da Baolik*). Bonjour Paot. Piou zo en ti.

PAOLIK

N'euz nemed Tad Koz ha me.

AN AOTROU KURE

(*En eur zont en ti*). Doue ho pennigo. Ac'hanta Jerom an Duc, penaoz e za ganeomp ? (*en eur ginnig he zourn da Jerom*).

JEROM

(*En eur zellet piz hag en eur hasten he zourn evel gant aoun*). Braoik e za a drugare Doue.

AN AOTROU KURE

Ne anavezit ket ac'hanon Jerom ?

JEROM

Nan avad.

AN AOTROU KURE

Sellit mad ouzin.

JEROM

(*En eur boket da zourn an aotrou Kure*). O ! an aotrou Kure !

PAOLIK

(*Trist beteg breman a deu laouen-meur hag a lavar*). O ! aotrou Kure, me garfe rei eur pok d'eoc'h !

AN AOTROU KURE

Ro 'ta va mignoun bian.

JEROM

Eur blijadur dispar em euz ouz ho kuelef. Mes, penaoz e kredit bale e kreiz an deiz ? Gouzout a rit e maer noz-deiz o klask beleien ?

AN AOTROU KURE

Ne ket e m'ank e c'hoezan an dra-ze. Mes gouzout a rit ive e zeuz kals tud klanv breman. Ogen, evit savetei eun ene, eur beleg ne argilo na dirak an amzer na dirag ar boan, na dirag ar maro.

JEROM

Mes, aotrou Kure, ha ma c'hoarvesfe deoc'h beza paket evel an aotrou Persoun, petra e teufemp-ni da veza ? Red e vije zoken neuze mervel heb beleg !... Skrijuz eo sonjal en eur seurt tra ! ! !

PAOLIK

Aotrou Kure, an Aotrou'n Eskoben deuz ranket mont kuit ive ?

TAD KOZ

Paolik aman zo enkrezet kenan gant an Aotrou'n Eskob abalamour m'edo da veza konfirmet er blâ-man.

AN AOTROU KURE

Allaz ia, Paolik, an Aotrou'n Eskob en deuz ranket tec'hat gant ar re genta. En em gavet eo yac'h e Bro-Zaoz a drugare Doue.

PAOLIK

Penaoz eo eat an Aotrou'n Eskob da Vro-Zaoz ?

AN AOTROU KURE

Penaoz ? En eur vag vian euz a Rosko, ha guisket evel eur pesketaer.

TAD KOZ ha PAOLIK

O ! ! !

AN AOTROU KURE

Mab maner ar Gernevez a ioa bet oc'h hentcha an Aotrou'n Eskob betek ar vag, e kreiz an noz a c'hellit kredi. Pebez disparti truezuz ! Setu aman petra em euz klevet gant an aotrou Herve de Poulpiquet, he-unan : « Pa oue savet an Aotrou'n Eskob

el lestr, e lavaraz d'eomp c'hoaz : O trugarekad a ran a greiz kaloun da vezo bet an ardiziegez d'am hentcha betek aman. Kenavo an distro, ma plij gant Doue. Kenavo, va Iliz katedral benniget, unan euz ar re gaera e Frans ! Kenavo, kastelliz, kenavo va eskobti muia karet ! ! hag en ear ouela dôurek, an Aotrou'n Eskob a roaz d'eomp he vennoz diveza : *(Skei a rear var an or : an oll zo enkrezet, ha Tad Koz a ra sin d'an aotrou Kure da vont da guzat).*

(An hini zo e kichen an or). He ! n'euz den en ti ?

TAD KOZ

(En eur vont da zigeri). Eo, eo, tud zo. *(Pen deuz digoret an nor).* Sell, te eo zo aze Oulier ?

OULIER

Me eo zur. Mes, hag e prenned da zor e kreiz an deiz ?

JEROM

Asa, daoust hag e c'heller beza dizoursi breman, kement-all a ganaillez a red dre an hentchou.

OULIER

Guir eo kement-se ayad. Prestik an dud honest ne c'hellint mui bale. Hag ouspen, da unan emañ kredabl hirio. Evit duman ne zeuz nemedoun-me er gear. Ar re all zo eat oll da Gastel.

TAD KOZ

Aman ne zeuz nemed Paolik ha me ive ; mes eun Aotrou zo deuet d'hor guelek ; sellit, marteze ec'h anavezit anezhan ?

AN AOTROU KURE

(*Ho vont varzu Oulier en eur vouse'hoarzin*).
Iac'h oc'h Oulier ?

OULIER

Sell ? An aotrou Kure ! (*Starda a reont ho daouarn*).

TAD KOZ

Koumpren, Oulier, me ne meuz ket anavezet an aotrou Kure.

OULIER

E guirionez n'o peuz ket tre ar memez ear-gant an dillad-se, evel m'o poa gant ho soudanen. — Mes, aotrou Kure, goal hardiz ho kavan. Paket e viot ive gant ar revolutionerien, evel an aotrou persoun benniget.

TAD KOZ

Sell ia, n'em euz ket sonjet c'hoaz goulén menek euz hon aotrou persoun ganeoc'h. Ne c'hoezit ket pelec'h eman ?

OULIER

Pelec'h eman ? Evidon-me c'hoar pelec'h eman. He ene zo aze er barados. Rak merzeriet eo pell-zo, an dra-ze zo zur.

AN AOTROU KURE

Ne gredan ket e ve lazé evit c'hoaz, a drugare Doue. E Kastel an Taro eo bet prizouniet epad pevar miz, ha breman, e kreder eo kaset d'an Allemagn ! Evelse, va zud mad, ne d'omp ket da goll fizians, ha pedomp kalounek evit ma plijo gant Doue digas deomp dizale en dro hor persoun santel.

TAD KOZ

O ! ma teufe zur !

PAOLIK

Aotrou Kure, me lavaro bemdez eur *bater* hag eun *ave maria*, evit goulén ma teuo an aotrou persoun en dro abenn pasq ar vugale.

TAD KOZ

Paolik en deuz aoun ne c'hellfe ket ober he basq !

AN AOTROU KURE

Ia, ia, Paolik, mad tre eo, gra bemdez ar beden-ze va mignoun.

OULIER

Evelato an aotrou Persoun n'e vije ket eat kuit en dervez-ze ive, m'en devije lezet Plougouloumiz d'he zifen ; rak evit ar zoudardet-se ne oant ket ouspen deomp.

AN AOTROU KURE

Kredi 'ran ac'hanoc'h avad ; rak an dud a ioa kounnaret.

OULIER

Kounnaret ? Ia, ke... ke... ken a verve ho'good. Per a zuman a ioa rampet e kichen ti ar c'hloc'her eur pikol fals strop gantan : « Ar c'heenta a lakei he zourn var an aotrou Persoun, eme Ber, a zo va fals-me var he c'houzok. »

AN AOTROU KURE

Ia, ... mes meur a hini a vije bet lazé ive.

OULIER

Mad, ha pa vije ? Neuze da vihana an aotrou Persoun en divije gellet chom dindan guz en hon touez evel doc'h ive. Eleac'h breman ma teuit da veza paket, ne vezo betek mad ebet ken da rei deomp hor sakramanchou.

AN AOTROU KURE

Kals plijadur em euz ouz ho klevet o komz gant kement a feiz hag a galon. Mes, mall eo d'in mont. Bez' em euz c'hoaz daou glanv da velet, hag eur vadiziant da ober e Tregor. Hirio e kav d'in e c'hell-lan bale dizoursi, n'eo ket guir ?

OULIER

O ia, ia, aotrou Kure, evit hirio ar zoudarded hag an archerien o deuz krogat awalc'h e Kastel. Mes, ma c'hellont lakad ar re iaouank da denna d'ar zort, neuze da c'houde e c'halopint da glask beleien adarre avad. Dre-ze aotrou Kure, neket abalamour deoc'h — rak me oar e vijec'h laouen o vont d'ar prizoun ha d'ar maro zoken — mez abalamour deomp-ni, abalamour d'hon eneo, en em guzit mad !

AN AOTROU KURE

Ia, ia, entetet eo. Alo, kenavo mignouned (*Rei a ra he zourn dezho*). (*Pokat a ra da Baolik*).

JEROM

Aotrou Kure, me fell din kovez araog ma zeoc'h kuit. Rak piou a c'hoar peur e c'hellin ho kuelet marteze.

AN AOTROU KURE

Mad, d'an Dourduff e rankan mont ive. Grit

ho marvailladen da genta, ha mar gellan en diztro e kovesein ac'hanoc'h. Kenavo bremaik.

AN OLL

Kenavo-ta, aotrou Kure.

JEROM

Ha ra blijio gant Doue ho tiual diouz peb drouk.

TAD KOZ

Paolik, va mabig-me, mall eo dit mont da zioual ar zaout.

PAOLIK

Mont a ran dioc'htu, Tad Koz.

TAD KOZ

Kea gantho e kostez Tredern ha Kerautret, dre eno ez euz peuri.

PAOLIK

Entetet eo tad koz. (*Paolik a ia kuit*).

OULIER

Daoust penaoz e tremeno an traou e Kastel hirio ive.

JEROM

Va Doue ia, te lavar.

OULIER

Evidon-me 'gred potred ar C'halvados, da lavaret eo ar revolutionerien zo deuet da lakad freuz er vro, a en em gavo gantho evel zo en em gavet gant Corbet, e Plabennec.

JEROM

Petra zo en em gavet eno 'ta ?

OULIER

N'e peuz ket klevet ?

JEROM

N'em euz klevet grik.

OULIER

Mad, e foar Lesneven dilun ne' ioa kaoz nemed euz an tennerez d'ar zort e Plabennec.

JEROM

E Plabennec o deuz pleget neuze ?

OULIER

Ia, bremaïk e klevi penaoz o deuz pleget potred Plabennec. Pemzek dervez zo hirio e tlefe beza bet an tennerez eno. Mez hini euz a botred an tenn ne lakeaz he zourn er pod.

JEROM

Ah !

OULIER

Den ne zeaz vardro. Neuze eun dispac'her braz euz a Lambazellec, hanvet Corbet, a ziredas da Plabennec gant eur guchen zoudardet.

JEROM

Da ober petra ?

OULIER

Da ober petra ? Da glask ober aoun da Plabennegiz ive zur. Sonjal a rea en divije lakeat koue-

riaded Plabennec da grena dirazhan evel dimezellet. Mes, allaz ! Kaer en deuz kaozeal flour, liva geier, kaozeal rust, mont ha dont euz an eil banden d'eben, den ne ra van evit he glevet. Petra reaz neuze ? Distaga eur grabanad gant eur paot iaouank, ha lakad he fri da c'hoad. Allaz ! Pa oue gullet ar goad, neuze e savaz freuz ha kri avad. Ar zoudarded a grogaz aoun enno hag a c'haloupaz kuit. Petra reaz neuze Plabennegiz ? Sailla a reont var ar C'habiten hag he anter laza a daoliou baz. Republikaned ruz Lannilis a ioa kaset kelou dezho gant Corbet da zont ive da Plabennec. Dont a rachent. Mes pa velchont korf Corbet hastennet var leur-gear ar reaman a skubas buan en dro.

JEROM

Poent oa dezho, kredabl.

OULIER

Mad, klaoustre e Kastel e ruילו ar goad hirio ive ?

JEROM

Siouas ! E c'helfe ober avad, rak an dud zo kintou enno.

OULIER

Kintou ? Ia, ken a verv ar goad en ho biz bian. Ar mab a zuman zo eat he fusul gantha : « Tonnerde, a lavare Per, araog ma zai va dourn-me er pod, houman en devezo kranchet var unan benag ive. Me, eme Ber, zo kountant da vont da zoudard, ia evit difen ar vro. Ne ket avad evit ober brezel d'an Aotrou Doue, ha da dud va bro eo. » Ha n'ema ket ar rezoun gant Per, Jerom ?

JEROM

Eo, eo, kaozeal mad a rea Per. Mes allaz ! Pe-

naoz e c'hellint herzel ? Gant lod e vezo fuzulliou, guir eo, mes gant kals ne vezo nemed eur fals pe eur vaz. Ogen, petra rei ar re-man gant ho bicher a eneb kanoliou, fuzulliou ha baïonnetez ar zoudardet ?

OULIER

(*Gant ruster*). Petra raint ? Mervel ma vez red evit ho Doue hag ho bro !!!

PAOLIK

(*O tont d'ar red*). O ! Tad Koz, nag a drouz hag a gri a zo e kostez Kastel !

TAD KOZ

E zeuz, va Mabig ? Klevet e peuz trouz ?

PAOLIK


O ia, deuz Pontplinkoat e klever mad an tennou.

OULIER

(*En eur zevel*). Sklear eo neuze petra zo a nevez. Emaer o rei eur c'hempen da botred ar C'halvados. Mont a ran pella ma c'hellin var hent Kastel, ha marteze ec'h en em gavo unan benag ganen o tistrei d'ar gear.

JEROM

(*En eur gemeret he japeled*). Ha me ia da lavaret va japeled, evit ma plijo gant Doue hag Introun Varia Prat-Koulm rei nerz kaloun da Blou-gouloumiz da stourm a eneb enebourien Doue hag ar vro !



TREDE ARVEST

C'hoarierien :

TAD KOZ.

KOULM.

OULIER.

JEROM.

PER, *mab Oulier.*

PAOLIK.

AN ADTROU DE KERBALANEK, ha pevar pe pemp d'he heul.

Tremen a ra er memez leac'h

TAD KOZ

(*En eur zellet ouz an horolach*). Seiz heur sou-net ha n'euz den diztro c'hoaz euz a Gastel. Daoust petra zo tremenet eno hirio ! Souezuz eo dreist-oll ne ket digouezet Mari c'hoaz, pe guir e c'hoar n'euz den er gear da c'horio ar zaout ha da aoza koan.

(*Trouz a glever er porz*). Sell, trouz zo, erru e zeuz unan benag. Ah, Paolik a ioa eat da velet a trouz a glefche atao e kostez Kastel, kredabl hen eo a zo o tont en dro. Sell, ne ket avad, Koulm eo. O nag a vall em oa d'az guele ! Ac'hanta penaoz eo eat an traou e Kastel ?

KOULM

Siouaz ! N'int ket eat kaer avad, Tad Koz !

TAD KOZ

Difisians em oa. — N'euz en em gavet droug ebet ganez da vihana ?

KOULM

Nan, tad koz, evidon-me zo dibistig, a drugare Doue.

TAD KOZ

Mes,... ha da vamm, pelec'h eo choumet ?

(*Koulm, trist meurbed, a zoubl he benn heb respount*).

TAD KOZ

Respount 'ta buan ? pelec'h eo choumet da vamm.

KOULM

(*Var an tòn guela*). E Kastel eo choumet, tad koz.

TAD KOZ

Ha ! Koumpren a ran !... Da vamm a zo maro !
(*gouela a ra*).

KOULM

N'eo ket, n'eo ket, tad koz, glazet nemed ken.

TAD KOZ

Goall c'hlazet eo marteze ?

KOULM

Eun taol baïonnettez en he breac'h deou.

TAD KOZ

Ar grisder o doa da skei var merc'hed ?

KOULM

O, ne respetent den, na koz, na merc'hed, na bugale !

TAD KOZ

Tud digaloun !

OULIER

(*En eur zont en ti*). Sell, Koulm zo en em gavet er gear ? Ac'hanta penaoz eo eat an traou ?

TAD KOZ

He vamm a zo glazet !

OULIER

Mad, petra fell deoc'h. Red eo kaout kaloun, Jerom. Ha neuze, para a rai.

TAD KOZ

Ha ma ne ra ket ! Neuz maouez all ebet en ti !

OULIER

Ma ne ra ket e vezo eur verzerez, eur zantez er barados !

TAD KOZ

Vardro pe boent e zavet an trouz ?

KOULM

Vardro teir heur. — Abaoue ar mintin ar zoudardet ne ehanent da vale dre gear gant ho fuzul-liou hag ar vaïonnettez e beg ar fusul. Mes kaer o doa mont ha dont gant ho armou ne reant ket a aoun deomp-ni.

OULIER

E pelec'h edoc'hui neuze ?

KOULM

Lod ac'hanomp a joume en tiez, lod all a bour-

mene dre gear en eur ober sellou du var ar zoudardet hag ouz ar c'hanoliou braket varnomp.

OULIER

Kanoliou o deuz ive ?

Deg pezh kanol a zo en dro d'ar gatedrall, ho ginou bras troet varzu kear.

OULIER

Chèchus chèchus !

KOULM

Pa zounaz kreiz-deiz er gatedrall. — Ne c'hoezan ket piou zo bet o seni, mes evit soanet eo bet hirio. — Pa zounaz kreiz-deiz eta an dud a iez oll var ha daoulin da lavaret an angelus.

TAD KOZ

Ar zoudarded a c'hoarze neuze kredabl ?

KOULM

Mar douen ne reant ket, ne vije ket bet brao dezho. Dre ma tremene an dervez e kreske ive an trouz. Hor mammou ne ziskrogent ket ac'hanomp. Dre ma zeemp dre gear e teuent var hor lerc'h, hag e lavarent en eur ouela : « Evidod-te va mab ne zi ket euz ar gear. Nan, nan avad. Da ober petra ez afez ? Da zikour an dud kris-se da laerez an ilizou hag ar c'houentchou, ha da gas an dud vad d'ar maro ? Ober al labour milliget-se gant ho bugale mar keront, mes evit va mab-me ne 'z ai ket gantho.

OULIER

Setu aze kaozeal ! M'o divije oll vammou Frans komzet evelse d'ho bugale, klaoustre, an ilizou ne vijent ket bet-serret, ar c'hroaziou ne vijent ket

bruzunet, ar vro ne vije ket dismantret. Ar vamm eo a zao ar c'hrouadur, ha pa vez feiz ha kouraj (boeder) e kaloun ar vamm, e vez ive e kaloun ar

KOULM

Kredi a ran ac'hanoc'h avad. E guirionez ma oa soun hor penn ganeomp araog, neuze da vihana e verve hor goad ! Klemmou hag huanadou hon tud a ranne hor c'haloun. Mont a rejomp d'ober tro kear en eur gana ; ha peb banden, d'he zro, a gane an diskan-man : « Petra reoc'h-c'hui kamara-ded, da heul Canclaux o peuz c'hoant monet ? Evidomp-ni ne zeomp ket, guel eo ganeomp beza lazet ! »

Ar zoudardet ne c'houient ket petra ganemp, mes o velet hon daoulagad ken entanet, hor bale ken dichek e krogaz aoun enno.

OULIER

Hag ar re goz, petra reant epad an amzer-ze ?

KOULM

Lod anezho a ioa er prenescher o sellet ouzomp, lod all e korn ar ruiou, ha pa dremenemp e krient varnomp : « Dalc'hit mad potred ! » Anat oa eta e vije trouz ha kann araog tenna d'ar zort.

Petra reaz kabiten ar C'halvados neuze ? Mont d'an ti kear, pe da vihana d'an eskobti — rak an eskobti eo a zo breman o servichout da di kear.

OULIER

Ne ket possubl ?

KOULM

Evel pa lavaran deoc'h.

JEROM hag OULIER

Chè !!!

KOULM

Hemañ a ieaz eta d'an Eskobti da c'houlenn poultr ha ploum c'hoaz digant ar mear, Prudhom Kerlangon. — Euz a beleac'h e roñ deoc'h, eme an aotrou Mear, n'em euz ket. — A ! ne roi ket, eme baot ar C'halvados, ne roi ket, an dra-ze a gousto ker did. Me zo o vont da ziskouez did n'em euz aoun nag e raok mear nag e raok den ! « Soudardet emezhan, krogit er mear fall-ze ha digasit anezhan var al leur-gear. » Ar zoudardet a lammaz varnhan evel bleizi hag a dreinaz anezhan e kreiz ar blasen. Neuze ar c'houmandant en arraj a lavar dezho : « Dao dezhan ! » ha kerkent ar mear keaz, republikan goulskoude, a oue treuzet ha flastret a daoliou kleze hag a daoliou kroz fusul !

JEROM

Red eo beza kriz evelato !

OULIER

An dud gouez ne rafent ket goassoc'h.

KOULM

Potred ar C'halvados a gave dezho o divije spouñtet ac'hanomp-ni gant ho c'hrisder, ar c'hountroñ eo a erruaz. Guelet korfan hini maro, lazet ken didruez, a lakeaz pennou an oll da drei. Den, na goaz, na maouez, n'en deuz aoun. Unan a griaz : « Dao dezho potred ! » — Ha kerkent, oll assamblez e lammomp var ar revolutionerien. Bunta a reomp ar zoudardet, skei a reomp a gleiz hag a ziou, hag en eun taol ez eomp betek mogerioù ar gatedral ; ar peziou kanol a ioa etre hon daouarn.

OULIER

Ha petra 'rit gant ar c'hanoliou-ze ?

KOULM

Netra, rak den ne oar penaoz tenna gantho. Ar zoudardet goulskoude a joumaz sebezet ouz hor guelet ken himoret. Potred ar C'halvados zoken a redas kuit. Mez ar c'houmandant bras ne gollaz ket he benn evit kement-se. Guelet a reaz buan n'oa urz vad ebed en hon touez-ni, ha ne c'houiemp ket stok ar vrezel.

OULIER

Ha petra reaz neuze ?

KOULM

Petra reaz ? destum trumma ma c'hellaz soudardet Mountroulez en dro dezhan, ha koummandi dezho : « Allons, sitoyens, baïonnettes au canon, et en avant » « Alo, sitoyanet ar vaïonnettez e beg ar fusul, hag a ben herr var ar re-ze ; arabad damanti den : na koz, na iaouank, na maouez.

OULIER

Pebez den kriz !

KOULM

Kerkent ar zoudardet a lam varnomp : Skei a reont a dreuz hag a hed ; toulgoñ a reont hema, dalla a reont hennez, terri a reont he c'harr da unan, he vrec'h da eun all.

OULIER ha JEROM

Ho ! ho !

KOULM

Ni a en em zifenne ive guella ma c'hellemp. Mes allaz ! A eneb beg lem ar vaïonnettez, petra oa hor bicher, petra oa zoken hor fuzullioù ? Da goummans

kear Gastel a dregernaz gant an tennou ; breman ne glever mui nemet klemmou glac'haruz ar re c'hlazet. Ni ne c'houiemp ket hor micher c'hoaz, edot ouz hen deski deomp. Ar goad a rede, ha meur a hini siouaz a ioa astennet var ar pave. — Kailla on deuz ranket eta, heb gellout zoken digas ganeomp hon oll dud lazeta pe mac'hagnet.

JEROM

(*En eur ouela*). Mes, da vamm a zo choumet etre daouarn ar zoudardet neuze ?

KOULM

Ne ket, ne ket, tad koz, gallet em euz he c'has betek an hospital, a drugare Doue.

JEROM

Va Doue, va Doue, e ma hor bro etre daouarn ar revolutionerien. Kement or beuz a vezo laeret ha dismantret ; ha kasi-oll e vezimp lazeta gant an dud kriz-se.

KOULM

(*Gant herr*). O ! marteze ive tad koz. Kollet or beuz hirio ; mes n'or beuz ket kollet a galoun evit kementse, ha varc'hoaz, ma vez kountant Doue ez aimp adarre d'ezho.

OULIER

Varc'hoaz zoken ? Mes an dud zo eat d'ar gear breman ?

KOULM

O n'int ket ! Ar zoudarded a deuaz var hor lerc'h betek kroaz Kombot. Mes eno ar re o doa fuzulliou a ioa kuzet a dren ar c'hleuziou ; ha pedo ar zoudardet a zindan tenn : tan varnho.

Ar c'houmandant o velet he zoudardet o rodella var an hent heb gellout gouzout mad a beleac'h e leue an tennou, a zantaz c'hoenn en he lerou, hag hen kerkent a lavaret d'he zoudardet : « Demi-tour », ha iao en dro da Gastel.

Neuze ni a gommansas da youc'hal varnho. ha da grial : Kenavo varc'hoaz. Mes me zo deuet trumm d'ar gear neuze ; rak m'o pije bet klevet ar c'helou trist gant eun all, o pefe sonjet marteze e oue en em gavet goassoc'h c'hoaz gant va mamm.

TAD KOZ

Ia, kountant oun avad o veza ma 'z out deuet betek ennhon kenta ma peuz gallet... brema da vihana e c'hoezan ar virionez.

OULIER

Me zo o vont d'ar gear breman, rak ar re all a dle beza tost ive ?

KOULM

Souezet oun zoken ne vent ket en em gavet dija. (*Per a deu en ti*). Sell, setu aman Per.

OULIER

O ! va mab ker, nag a vall em oa d'as gullet. Ac'hanta penaoz emaut ?

PER

Brao tre, va zad, evel ma velit.

OULIER

N'euz en em gavet drouk ebet ganez ?

PER

Eo douctus ! Boulou ar sitoyanet n'int ket goest

da doulla va c'hroc'hen-me... Mes, tudou, n'euz ket a amzer da goll. Aze eo erru an aotrou de Kerbanalek, ha kals re all de heul.

KOULM

Aman eo int erru ?

PER

Aman, e bourg Plougoulm eo e lakeat ar « rendez-vous » abenn varc'hoaz. (*Da Goulm*). Te a ioa ganeomp beteg fin an emgann ?

KOULM

O beteg ar fin avad.

PER

Mad, setu aman penaoz eo tremenet en traou abaoe. Kerkent m'o deuz ar zoudardet troet ho c'hillourou varzu Kastel e zoump eat a vanden da bedi ha da aspedi an aotrou Kerbanalek d'en em lakad en hor penn. Guelet a rit, eme-ni, ne ket na bolontez vad na kaloun a vank deomp, mes ne c'houezomp ket en em ganna. C'houi, aotrou Kerbalanek, zo eun den a vrezel ; en em lakit eta en hor penn ; renit ac'hanomp, ha ni oll zo prest da doui e sentimp ouzoc'h e peb leac'h, e peb fesoun. — An aotrou Kerbanalek a zavaz neuze var groaz Kombot hag a lavaras : Va Mignoured, emezhan, anzañ a rankan e guirionez, e vezimp lazec'h kasi oll ma ne vez ket muioc'h a urz en hon touez. Va fed i a rit d'en em lakad en ho penn : Mad, hen ober a rin, evit Doue hag ar vro. Mes, n'euz ket a amzer da goll. Selaouit mad petra on deuz da ober. Canceled, evel a c'houezit n'eman ket breman e Kastel. Eat eo d'en em ganna ouz potred Guipavas, Gouesnou ha Plabennec. Mes gouzout a ran e zeuz kaset kelou dezhan da zont en dro da Gastel kenta ma c'hello. Evelse

a benn varc'hoaz da noz pe anter-noz, Canceled a vezo diztro da Gastel. Red eo deomp eta sailla var botred ar C'halvadoz araog mac'h en em gavo Canceled. Mes, n'oump ket niveruz awalc'h c'hoaz evit stourm a eneb ar zoudardet zo e Kastel, dre ma 'z int armet mad. Red eo eta da gals ac'hanoc'h mont buanna ma c'hellint peb hini d'he garter, ha lavaret da oll c'hoazet ho parrez, ha d'ar re divar dro, dreist-oll d'ar re iaouank, en em gaout muia ma c'hellint e bourg Plougoulm abenn varc'hoaz vintin, mar gellont, ha digas gantho fuzulliou, freier, eskennou-prad, ha kemend a c'hell terri ho fenn euz ar revolutionerien. » Entetet eo ? — « Ia, ia, eme an oll, entetet mad eo. Mont a reomp dioustu da gas kelou d'ar re zo er gear. » — « Ia, va Mignoured, kerzit dioustu. Evit an Hini a zo stag ouz ar groazman evidomp eo e stourmomp. Me a vezo e bourg Plougoulm ouz ho kortoz. Kenavo varc'hoaz vintin, ha bevet leoniz ! »

JEROM, OULIER, KOULM

Kaozeal mad a ra avat.

PER

Setu aze petra zo da ober abenn varc'hoaz, An aotrou Kerbanalek zo choumet varlerc'h gant eun neubeud hiniennou evit guelet ma neuz den ouz hor spia. Mes tost int d'en em gaout. Evelse deomp d'ar gear breman, va zad. Rak a dra zur hon devezo kamaladet da goania ha da loja.

JEROM

Ia, va mab ker, deomp da zigemeret an dud kalounek-se. (*Oulier hag he vab o vont kuit*). Kenavo mignoured ker.

JEROM hag he Vab

Kenavo ta, ha yec'hed mad deoc'h.

TAD KOZ

Va Mab keaz, te a dle beza du gant an naoun.
Mes, va Doue, n'euz prest tam.

KOULM

(*En eur gregi en dorz vara hag er gountel*). O,
bara a zo a drugare Doue, an hini en deuz bara
evel heman da zrebi zo pec'hed dezhan klemm.

TAD KOZ

Kaozeal mad a rez, va mab. N'hon deuz nemed
trugarekad Doue euz hor bara pemdeziek.

(*Paolik a deu en ti*).

TAD KOZ

Lakeat e peuz ar chatal en ho c'hraou Paolik ?

PAOLIK

O ia, ha troet ho c'hoan dezho ive. Mes mamm ne
ket deuet c'hoaz ?

KOULM

Nan, Paolik, ne ket en em gavet c'hoaz.

PAOLIK

Piou a c'horio ar zaout neuze ?

TAD KOZ

Kea da velet ha Marc'harit ar Goariven a c'helle
dont d'ho goro, va mabig. Ne peuz ket izoum da
gaout aoun, sklear al loar.

PAOLIK

Mad, mont a ran. (*Mont a ra kuit*).

TAD KOZ

En diztro e lavarin d'ezhan kemeret eun tamm bara,
lavaret he *bater* ha mont d'he vele. Mes, er Goari-
ven e c'helle klevet petra zo en em gavet gant he
vamm ; neuze ne gousko berad epad an noz, ar paour
keaz paot.

(*Eur paot iaouank a deu en ti en eur lavaret*).
An aotrou Kerbanalek, hor c'hoummandant eo a
deu d'ho kuelek Jerom.

AN AOTROU KERBANALEK

(*An aotrou Kerbanalek a deu tre en ti, pevar pe
pemp paot iaouank var he lerc'h, en eur lavaret*).
Doue ho pennigo.

JEROM

Bennoz Doue deoc'h, aotrou kalounek.

AN AOTROU KERBANALEK

Yac'h oc'h tad koz ?

TAD KOZ

Me a ia atao a drugare Doue. Mes va zud, siouaz,
n'int ket deuet oll euz a Gastel. (*An Tad Koz a ouel*).

AN AOTROU KERBANALEK

Nan, klevet em euz eo goal c'hlazet greg an
ti-man var an dachen vrezel, ha setu perak eo fal-
vezet ganen dont va unan da lavaret deoc'h e ke-
meromp kals perz en ho klac'har... Ne welit ket,
tad koz, kemerit kaloun. Leac'h a zo e guirionez
da veza ankeniet. Rak ne ket tud leal eo a zo breman
o c'houarn hor bro, mez eur vanden dispac'herien.
Ne respetont na kroaz, nag iliz, na belek, na mamm
na bugale ; mes, (*gant herder*) ni ho c'hastizo, ni
ho diskaro, pe ni a varvo, neketa potred ?

KOULM *hag ar re iaouank*

Ia, ia, ni ho c'hastizo, pe ni a varvo.

AN AOTROU KERBANALEK

Kaset em euz kelou da c'hoazed an oll barre-
ziou divar dro. Kals anezho a zo en em zestumet
dija evit mont var ar revolutionerien, ha sur oun
e vezo digouezet eur maread tud e bourg Plougoulm
araok varc'hoaz mintin. Mall eo d'eomp eta mont da
glask eun tam benag, rak an darn vrasa ac'hanomp
n'o deuz bet begad abaoe ar mintin. (*En eur asten
he zourn da lavaret kenavo da Dad Koz*). Kenavo, Tad
koz, ha goulennit bennoz an aotrou Doue hag Introun
Varia Prat-Koulm varnomp.

TAD KOZ

O ! aotrou Kerbanalek, na me a vije bet joa
ganen guele eun den evelloc'h o preja e va zi.
Mes, va jamez, n'euz ket eur vaouez zoken da ober
deoc'h eur banne souben !

AN AOTROU KERBANALEK

Dre ma teuemp Plougoulmiz a grie varnomp :
« Deuit da goania ganeomp-ni-ta ! » Lavaret em euz
d'am zud en em ranna, ha mont eur guchen da
bep ti. Evelse lod zo eat d'ar Stang, lod all da Brat-
Peat, d'ar Varquez, lod all d'ar Groaz-Vean, lod all
da Kerculaouen, da Keranfaro, da Bouleské, ha da
veur a leac'h all. Me hag ar botred iaouank-man
a jomo laouen avad ganeoc'h... Ne dit ket da go-
zeal deomp avad euz a zouben, eun tamm bara ha
netra ken (*en eur zellet ouz ar botred*). Kuir ?

AR BOTRED

Nan, nan, ha pa vije bara zeac'h zoken.

KOULM

(*En eur lakat ar c'hig var an daol*). O ! bara
zeac'h.

AN AOTROU KERBANALEK

Kig sall zo ive ? Guella tra a gavan gant eun
tam bara du !

EUR PAOT IAOUANK

Friko beteg naonteg guenneg.

TAD KOZ

Eun tamm guele zoken em euz ive evidoc'hui,
aotrou Kerbanalek.

AN AOTROU KERBANALEK

O trugarekat a ran, tad koz... Mes pa vez an
enebour var ar seuliou, evel m'eman var hon re-ni,
neuz ket amzer da vont e gueleou. Va mignouned
a ielo da ober eur c'houisk etouez ar c'holo ma
keront. Me a joumo var zao epad an noz. Ma zoc'h
kountant avad e teuin aman avehou da skriva ha
da rei va urziou d'an dud dre m'en em gaviat.


TAD KOZ

Aotrou Kerbanalek, ar pezh a zo aman a zo d'eoc'h.
ha dre-ze en em zervichit anezho ervez ho polontez.

AN AOTROU KERBANALEK

Bennoz Doue deoc'h, tad koz. Alo potred, sta-
gomp buan, evit m'on devezo muioc'h a nerz da
stourm a eneb enebourien Doue hag enebourien
Breiz-Izel : Benedicite (*oll assambles*) Dominus nos...





PEVARED ARVEST

Tremen a ra er memez leac'h

C'hoarterien :

AN AOTROU DE KERBANALEK.

IAN KEROUZERE.

EUR GOUARD.

IAN KERANGUEVEN ha daou pe dri all d'he heul.

POAL INIZAN ha daou pe dri ouz he heul.

PER PRIGENT.

LAURANS AR SANN.

PER.

Unan deuet euz ar Stang. Pe PER.

Unan iaouank euz a Lesneven.

EUR GOUARD

Aotrou Kerbanalek, potred Sibiril ha Cleder zo en em gavet, ha Ian Kerangueven euz a veureuri Kerouzere zo e penn ar vanden.

AN AOTROU KERBANALEK

Lavarit d'ezhan dont d'am c'haout dioustu.

EUR GOUARD

Entetet eo mestr.

AN AOTROU KERBANALEK

(*En eur zellet ouz he vounte*). Ne ket peder heur c'hoaz ha dija ec'h en em gav tud, mad e za an traou.

IAN KEROUZERE

(*En eur antreal gant daou pe tri all*). Salud deoc'h koummandant.

AN AOTROU KERBANALEK

(*En eur rei an dourn dezho*). Ha deoc'h Yan Kerouze. Dija oc'h en em gavet ? Noc'h ket choumet da varc'hata.

IAN KEROUZERE

Da varc'hata ? Eo marteze. Deac'h edomp e Kastel ive zoken. Pell zo edomp o c'hortoz ma vijet en em zavet. Rak pec'hed eo lezel tud evelse da vale var douar Breiz-Izel. Me zo bet soudart ive gant aotrou Kerouze : ia, evit difen ar Frans a eneb he enebourien ; ne ket avad evit laerez ha laza tud ar vro oa.

AN AOTROU KERBANALEK

Skrijus eo, e guirionez gullet petra 'ra ar re ruz-se dre ar vro.

UNAN EUZ AR RE IAOUANK

Hag e fell d'ezho ez afemp-ni da zoudardet evit ho zikour da laza kristenien ha da ziskar kroachou ? Biken avad !

AR RE IAOUANK

Nan, biken.

AN AOTROU KERBANALEK

Komprenit, petra o deuz great soudardet Mountroulez ! Klevet o peuz marteze ?

AN OLL

N'on deuz ket avad.

AN AOTROU KERBANALEK

Mad, setu aman : evel ma ne c'heller mont mui d'an iliz parrez da ober an ofisou, tud Sant-Thegonnec, Guiclan, Lambaol-Guimiliau, an Dre Nevez ha Guimiliau, a en em glevaz evit mont da bardouna, da lun ar rogationou, da japel Santez Berc'hed. e St-Thégonnec. En em gaout a dlient oll var dro deg heur-nouz e kichen Pont-Glaz. — Mes, allaz, trubardet a zo e peb leac'h ! — hag unan benag a oue fall awalac'h evit lavaret da gabiten ar zoudardet e l'lie tud St-Thegonnec ha divar dro, mont d'ar chapel-ze da bardouna da zeg heur noz. Heman, fouge an diaoul en he galoun, a lavaraz : Varc'hoaz avad e vezo ruillet koueriaded. Varc'hoaz avad e vezo desket d'ezho pedi ! Hag hentchet mad gant an treitour ar c'habiten en em gavaz gant daou c'hant soudart en eul leac'h hanvet an Hent-Doun. An hent-se a ia var eun euz a C'himiliau da Santez Berc'hed, ha dreizhan e ranke tremen an dud evit mont d'ar chapel. Ar c'habiten a lakeaz eun hanter euz he zoudardet e peb hini euz an diou c'hoarem zo a bep tu d'an hent ha lavaret a reaz dezho : « Arabad finval ken breman. Mes pa lavarint deoc'h : tan ! e tennimp oll assamblez. Ententet eo ? » — « Ia, ia, eme ar zoudardet en eur c'hoarzin-judas, ententet mad eo. » — « Selaouit c'hoaz : Kerkent a m'o pezo tennet e redot da bep penn euz ar stread evit ho laza gant ho païonnettez pa glaskint mont kuit : Ententet o peuz ? » — « Ententet mad hon deuz, ha great e vezo. » — « Mar kirit beza didruez eme ar c'habiten c'hoaz, hini anezho ne zeï kuit. « Bezit dinec'h kabiten, eme ar zoudardet, evit didruez e vezimp. »

UNAN IAOUANK

Diaoulou evel ar re-ze a vije didruez sûr avad.

AN AOTROU KERBANALEK

Eun heur a ioa edo ar zoudarded gourvezet var ar c'hleuz pa glevchont mouezigou o kana litanniou an oll zent: « Peoc'h eme ar c'habiten, emaint erru Alo potred, ar biz var blien ar fusul, ha prest da denna pa lavarín. » — Hag an dud keiz, dinec'h na dispount, a iea varlerc'h ar groaz en eur bedi Doue a greiz kaloun. Pedont o kana ar geriou-man : « Dioc'h ar gounnar, ar gasoni ha peb c'hoant fall, delivrit ac'hanomp Jezuz » ar c'habiten a griaz: « tan, soudardet ! » Kerkent daou c'hant tenn fusul a grozaz, ha kalz euz ar vanden a gouezaz d'an douar. Ar re all, goazed ha merc'hed a oue saotret ha lazet a daoliou baïonettez gant ar zoudardet.

AN OLL

O ! o !

AN AOTROU KERBANALEK

Ped den a oue merzeriet en noz-se var hent San-tez Berc'hed ? Den n'her gouezo biken.

UNAN IAOUANK

Ha ne ket pec'hed neuze lezel ar seurt tud-se da vale ? O eo, pe ne ket Faïñch eo va hano-me.

IAN KERANGUEVEN

Mantruz eo sonjal en torfejou a ra an dispac'h-rien-ze e peb leac'h.

AN AOTROU KERBANALEK

E peb leac'h, siouaz !

IAN KERANGUEVEN

Klevet o peuz petra en deuz great eur vanden all e guelede Leon, e Kong ?

AN AOTROU KERBANALEK

Ne gav ket din em befe klevet.

IAN KERANGUEVEN

Me m'oa klevet, en deiz all e foar Lokournan.

Eun ugent soudart a iea euz a Blougonvelen da Gong, pa veljont var eur c'hleuz, eur paour keaz koz o keuneuta, evit gellout tomma eur banne souben ar brignen d'he lein. Unan euz ar zoudarded a vizaz en eur lavaret d'he gamaraded: « Sellit potred, setu aman penaoz e tiskaran-me va den d'an douar. » Kerkent an tenn a grozaz, hag ar paour keaz koz a ruillaz.

IAN KERANGUEVEN

Mar de permettet evelato ! Ar c'heaz-kosz-se da vihana n'oa guest d'ober droug da zen.

IAN KERANGUEVEN

N'eo ket echu. Prestik da c'houde, e kichen Lochrist, e velont o vont en ho raok eur vaouezik koz, daoubleget gant an oad, eur podad leaz en eun dourn, eur vaz aleg evit en em harpa en dourn all. « Sell 'ta, eme unan euz ar re ruz, setu aman avad eur jilgamez hag a ve brao da ober parez d'an hini koz a zo choumet duhount da ober he veac'h lann. Hennont a zo o klask lann da aoza lein hag houma zo bet o klask leaz da zouba : kasomp anezho o daou da di Lucifer da leina. » — « Ia da, avad, eme un all, guir a levere. » — Ha kerkent daouzek tenn fuzul a grozaz, hag ar c'heaz koz a rodellaz gant he fodad leaz, e c'horf draillet dre an hanter.

UNAN IAOUANK

Han, mont da laza eur vaouez koz ! Sklear eo ne glaskont nemed eun dra : laza ac'hanomp oll,

koz ha iaouank mar gellont. Alo, deomp d'ezho. Evidon-me e meuz mal da fourra va forc'h houarn e kov unan benag euz al loened gouez-se.

AN OLL

(*Gant herr*). Ia, ia, deomp dezho !

AN AOTROU KERBANALEK

Va mignoured, red eo deomp gortoz eun neubeud. Rak kals tud a en em gavo c'hoaz. Hag ouspen (*en eur zellet er meaz*) ne ket merket an ñeiz c'hoaz.

EUR GOUARD

Aotrou Kerbanalek. Setu digouezet potred Plouescat, Guinevez ha Trelez, ha digas a ran d'ho kaout, Paol Inizan euz a Lanseon, a zo e penn ar vanden. Setu breman, Per Prigent euz a Vitevede, ha Laurans ar Sann euz a Lopreden-Plouenan.

PAOL INIZAN

Doue ra vezo ganeoc'h, mignoured ker.

AN OLL

Ha ganeoc'h ive, breudeur kalounek.

AN AOTROU KERBANALEK

E trein emaoch neuze d'hor zikour da rei lam d'ar ganfarted-ze ?

PAOL INIZAN

E trein ? me gav d'in emamp e trein. Ni zo daou pe dri mil aze (*o tiskouez ar meaz*). Tri dervez-ze abaoe ma oamp en em glevet evit sailla var re Lesneven pe re Gastel.

UNAN IAOUANK

Mad an traou, tan a vezo.

PAOL INIZAN

Evidon-me n'oun ket evit repos abaoe ma 'z eo eat va breur gantho.

AN AOTROU KERBANALEK

Ho preur zo eat gantho ?

PAOL INIZAN

Va breur Glaoda, persoun e Plouzane, a ioa deuet d'ar gear da c'hortoz ma vije tremenet an amzer spountuz-man. Lorc'h a c'hellit kredi a ioa ennon o rei digemer dezhan. Mad, eun tam Judas, an Tunc a rear anezhan, a en em gavas duman en deiz all, e penn eur vanden zoudardet. Va breur a oue kavet, ha mont a rankas gantho. Da c'houde ez ejont d'ar bourg. An aotrou Persoun keaz a oue kavet, hag en despet d'he oad (79 vloas) e treinont anezhan d'ho heul. Euz a Winevez e zeont da Drelez. Furchal a reont e peb leac'h evit klask arc'hant Santez Ventrok hag arc'hanteri an iliz. A drugare Doue ar re-man a ioa kuzet mad a zindan eur mean bez er vered. An aotrou Cloarec avad a oue treinet euz he gador-govez, ha rankout a reaz mont dioc'h-tu da heul ar vanden jatal-ze. Tri beleg hag eur maread tud all a oue prizouniet gantho en dervez-ze e Kastel Brest. E peleac'h em'a hirio an dud keiz-se ? Petra eo deuet da veza va breur keaz ? Siouaz, marteze eo kouezet he benn dindan ar c'hillo-tin ! (*En eur ouela*). Va famill abez zo dija lazet gant ar vuntrerien-ze.

UNAN IAOUANK

O banden jatal, ploum dezho.

(*Unan euz a gumpagnunez Paol*). Koumprenit petra o deuz great c'hoaz e maner al Liorzou, e kichen Lanseon. Eno o deuz lazet an ozac'h, ar c'hreg

c'hoar da Baol aman, lazet ho daou grouadurik, ho daou vevel, hag araog mont kuit neuze o deuz lakeat an tan en ti.

UNAN IAOUANK

Alo, alo, an esken var gouzok an diaoulou-ze.

AN OLL

Ia, ia, d'eomp d'ezho dioc'htu.

LAURANS AR SANN

Eur ger c'hoaz araok mont d'an emgann : Ar pezh o peuz kountet d'eomp aze en deuz lakeat hor goad da virvi muioc'h-mui. Mad, hentchet gant Kere Pont-Eoun, e tigoueschent duman dilun, hag o doa great goassoc'h eged an traou-ze c'hoaz.

AN OLL

Ne ket possubl ?

LAURANS AR SANN

Eo siouaz ! Da c'houde m'o doa drebet, evet ha laeret ar pezh a blije dezho, evel ma reont e peb leac'h ; da c'houde m'o doa troet ha distroet peb tra evit klask beleien, unan anezho a remerkas ar groas a ioa er plas a henor a zioc'h an daol. « Sell, sell, emezhan, petra velan aze ? Gouzout a rit n'euz ket a aotre ken da zalc'her ar seurt-traou-ze eenn tiez ? » Kregi a reaz er grusifi, foultri a reaz anezhi a droujou var leur an ti : « Sellit, emezan neuze, en eur zevel e droad sellit, setu petra 'ran-me d'ho Toue, » hag e vruzunaz ar C'hrist gant eun taol troad !

AN OLL

O ! o !

LAURANS AR SANN

Evit diskouez deoc'h eo re wir ar pezh a lavaran, e meuz digasset ar groas hag an tammou ganen... Sellit, setu aze e pe stad o deuz lakeat kroaz hor Zalver.

PER PRIGENT

O ! n'on deuz ket a veac'h o kredi ac'hanoc'h. Imachou ar zent, kroaziou ar guerejou hag ar re savet gant hon tud koz var an hentchou a zo bruzunet gantho ive. Ha ni, siouaz evidomp, ni ho lez da ober !

AN AOTROU KERBANALEK

Gwir a levere, va mignoun. Ia, reir oump choumet da varc'hata araog en em entent da stourm ouz an dud difeiz-ze. Mes breman peguir ec'h anavezomp guelloc'h c'hoaz eun neubeudig euz an traou euzuz o deuz great e peb parrez, ha lezel a raimp-ni c'hoaz anezho da laerez hor madou da laza hon tud, da ziskar ar c'hroaziou, da zaotri hor chapelioù hag hon ilizou ?

AN OLL

(*Gant herr*). Nan, nan, d'eomp d'ezho.

AN AOTROU KERBANALEK

(*En em gemer he fuzul evit diblas*) Ia, deomp dezho breman. Evit Doue hag hor bro ni a stourmo beteg ar maro, neketa va mignouned ?

AN OLL

Ia, ia, beteg ar maro. (*En eur ziblas*). Deomp d'ezho.

EUR GOUARD

(*O tont gant herr*). Aotrou Kerbanalek ema erru ar zoudardet varnomp.

AN AOTROU KERBANALEK

Loc'het int euz a Gastel ?

EUR GOUARD

Ia, ia, e c'hellont beza dija tost da Groaz Combot.

AN AOTROU KERBANALEK

Peleac'h eman potred Plougoulm, ha Kastel ?

KOULM

Lod zo aman aotrou.

AN AOTROU KERBANALEK

It eun ugent ac'hanoc'h euz ar fuzuliu guella, da guzat e sao milin ar Stang. Pa vezo ar soudarded kenta, an avant-garde, a zindan tenn, e tennoc'h oc'h ugent assamblez.

Ententet eo ?

AN OLL

Ia, ia, aotrou.

AN AOTROU KERBANALEK

Me zear var ho lerc'h e lammoc'h euz an eil goarem en eben ; mes derc'hel atao da vont varzu Berven avad. — Komprenet oc'h euz ?

AN OLL

Ia, ia, ha great e vezo ar pezh a livirit.

AN AOTROU KERBANALEK

Karga reoc'h adarre trumma ma c'helloc'h, ha tan adarre kerkent a ma vezo an dispac'herien e beg ho fusul, evit lakad anzho da gemeret ho amzer.

PER

Houman a grancho bremaik avad.

AN AOTROU KERBANALEK

Da c'houde an tennou kenta, unan a deuio var loan da zigas kelou d'in, kuir ?

PER

Hag e teui, aotrou.

AN AOTROU KERBANALEK

Kerzit buan, breman, ha Doue ra vezo ganeoc'h. (*Mont a reont kuit gant herr en eur lavaret*). Prun dezho.

AN AOTROU KERBANALEK

Va Mignoured hirio on deuz oll eun dever striz da ober : red e d'eomp stourm beteg ar maro, evit hon Doue, hor bro Breiz-Izel.

PAOL INIZAN

Bezit dizoursi, aotrou, hen ober a raimp.

AN AOTROU KERBANALEK

Mes, en eur stourmad ne ket awalc'h enebi gant kaloun, red eo dreist-oll e ve peb hini en he blas. Ha setu perak, er vrezel dreist-oll, eo kals essoc'h senti eged koummandi.

PAOL INIZAN

N'on deuz ket a veac'h ouz ho kredi.

AN AOTROU KERBANALEK

Prometti a rit d'in senti ouzin e peb feson ?

AN OLL

Toui a reomp e sentimp ouzoc'h e peb feson ?

AN AOTROU KERBANALEK

Selaouit mad ac'hanon neuze.

EUR GOUARD

Aotrou, ama e zeuz en em gavet unan d'an daoulam hag a c'houlén parlant ganeoc'h dioustu.

AN AOTROU KERBANALEK

Digassit anezhan d'am c'haout.

Ar gouard a deu ganthan. (An estranjour en eur taludi an aotrou de Kerbanalek). Deut ouñ da lavaret deoc'h eo diblasset ar general Canclaux euz a Lesneven gant he zoudardet. Varzu Berven e teunt.

AN AOTROU KERBANALEK

Mil bennoz Doue deoc'h, va den mad, da veza kelennet ac'hanon. Doueti a rean ec'h en em gafche. Mes breman e velan petra meuz da ober. Ne ket tost c'hoaz evelato ?

AN ESTRANJOUR

O nan ! n'eman ket e Lanhouarne c'hoaz zoken ; rak me zo deuet d'an daoulam-rüz gant va loan, eleac'h ar zoudarded a deu goustad, rak daou bez kanol zo gantho ive.

AN AOTROU KERBANALEK

O trugarekad a ran a greiz kaloun, ha Doue ho paeo. *(Ar messaer a ia kuit).*

AN AOTROU KERBANALEK

Peleac'h eman potred Trelaouenan ?

Aman, aman aotrou. *(Daou pe d'ri a en em ziskouez).*

AN AOTROU KERBANALEK

Er mintin-man e meuz kaset dija Plougouloumiz da freuza pont Kergidu, mez klaskit eskennou, bouc'hili, ha kit buhan d'ho sikour. *(Ober a reont an neuz da vont kuit).*

Gortozit c'hoaz. Pa vezo freuzet ar pont e teoc'h da dosen Fantik. Entetet eo ?

(Oll botred Trelaouenan). Entetet mad eo.

AN AOTROU KERBANALEK

Kerzit buan.

C'houi eo Paol Inizan, kuir ?

PAOL INIZAN

Me eo.

AN AOTROU KERBANALEK

Gouzout a ran e zoc'h eun den karet hag eun den a galoun, c'hui a en em laka e penn potred Plouescat, Guinevez, Lanhouarne hag ar re divardro.

PAOL INIZAN

Hag e rin, aotrou.

AN AOTROU KERBANALEK

Mont a reoc'h gant ho panden da Dosen Fantik.

PAOL INIZAN

Hag e rin, aotrou.

AN AOTROU KERBANALEK

Eno, kousto pe gousto, e rankoc'h dere'hell penn d'ar zoudardet beteg ma c'hen em gavo ganeoc'h ar

AN OLL

Toui a reomp e sentimp ouzoc'h e peb feson ?

AN AOTROU KERBANALEK

Selaouit mad ac'hanon neuze.

EUR GOUARD

Aotrou, ama e zeuz en em gavet unan d'an daoulam hag a c'houlén parlant ganeoc'h dioustu.

AN AOTROU KERBANALEK

Digassit anezhan d'am c'haout.

Ar gouard a deu ganthan. (*An estranjour en eur staludi an aotrou de Kerbanalek*). Deut oun da lavaret deoc'h eo diblasset ar general Canclaux euz a Lesneven gant he zoudardet. Varzu Berven e teuont.

AN AOTROU KERBANALEK

Mil bennoz Doue deoc'h, va den mad, da veza kelennet ac'hanon. Doueti a rean ec'h en em gafche. Mes breman e velan petra meuz da ober. Ne ket tost c'hoaz evelato ?

AN ESTRANJOUR

O nan ! n'eman ket e Lanhouarne c'hoaz zoken ; rak me zo deuet d'an daoulam-rüz gant va loan, eleac'h ar zoudarded a deu goustad, rak daou bez kanol zo gantho ive.

AN AOTROU KERBANALEK

O trugarekad a ran a greiz kaloun, ha Doue ho paeo. (*Ar messaer a ia kuit*).

AN AOTROU KERBANALEK

Peleac'h eman potred Trelaouenan ?

Am'an, aman aotrou. (*Daou pe-dri a en em ziskouez*).

AN AOTROU KERBANALEK

Er mintin-man e meuz kaset dija Plougoulouniz da freuza pont Kergidu, miz klaskit eskennou, bouc'hili, ha kit buhan d'ho sikour. (*Ober a reont an neuz da vont kuit*).

Gortozit c'hoaz. Pa vezo freuzet ar pont e teoc'h da dosen Fantik. Entetet eo ?

(*Oll botred Trelaouenan*). Entetet mad eo.

AN AOTROU KERBANALEK

Kerzit buan.

C'hui eo Paol Inizan, kuir ?

PAOL INIZAN

Me eo.

AN AOTROU KERBANALEK

Gouzout a ran e zoc'h eun den karet hag eun den a galoun, c'hui a en em laka e penn potred Plouescat, Guinevez, Lanhouarne hag ar re divardro.

PAOL INIZAN

Hag e rin, aotrou.

AN AOTROU KERBANALEK

Mont a reoc'h gant ho panden da Dosen Fantik.

PAOL INIZAN

Hag e rin, aotrou.

AN AOTROU KERBANALEK

Eno, kousto pe gousto, e rankoc'h derc'hell penn d'ar zoudardet beteg ma c'hen em gavo ganeoc'h ar

re zo eat da freüza ar pont.

PAOL INIZAN

(*Gant herr*). Hag e raimp.

AN AOTROU KERBANALEK

Pa vezoc'h sûr e vezo freuzet ar pont e tec'hot
a neubeudou en eur vont varzu Kergidu.

PAOL INIZAN

Ententet eo.

AN AOTROU KERBANALEK

Piou zo e penn Guitevede hag ar re diouz an
fu-ze ?

PER PRIGENT

Fellout a ra d'ezho e zaffen-me en ho fenn.
ho fenn.

AN AOTROU KERBANALEK

Ne c'hellent ket ober guelloc'h choaz, Per Pri-
gent ; rak anaout a ran hoc'h himor. C'houi eta a
ielo da guzat a dren ar C'herigou ha Creac'h-Moiek.

PER PRIGENT

Dioustu ez eomp.

AN AOTROU KERBANALEK

C'houi, Ian Kerangueven, a ielo da guzat a dren
Pen-an-Traon ha Loclouar gant Sibirillis ha Cle-
deriz.

IAN KERANGUEVEN

Dioustu ez eomp.

AN AOTROU KERBANALEK

Gortozit eun neubeud. — Plouenaniz, Tauleadiz,
Plouvorniz, Mespaoliz, Plougouloumiz, Kastelliz hag
ar re all a joum c'hoaz aman a deuio ganen-me
adren Keryren. Oc'h en em ranna e meur a loden e
vezo essoc'h deomp en em guzat, ha rei da gredi
d'ar revolutionerien n'euz den var o lerc'h.

Evelse e rankoc'h choum sioul ha kuzet, ken
a gasin kelou d'eoc'h. Ententet eo ?

AN OLL

Ententet eo, aotrou.

AN AOTROU KERBANALEK

Pa vezo tremenet ar zoudarded, ha tost dija da
Gergidu, ni a ielo var ho lerc'h, hag er c'hiz-
ze e vezo trouc'het hent Kastel ouz ar zou-
dardet. Canclaux a deuio gant he regimant euz
a Lesneven, mes p'en em gavo e Kergidu e ranko
choum a za, pe guir ar pont a zo freuzet. Soudardet
Kastel a vezo kelc'het ganeomp ; ne c'hellint kel
ken neubeut dont var ho c'hiz peguir ni a vezo var
an hent. Red e vezo dezho 'ta beza beuzet er ganol,
pe beza lazet ganeomp-ni. Komprenet o peuz ?

IAN KERANGUEVEN

Koumprenet mad on deuz aotrou, ha mad-tre e
kavomp ho plan.

AN AOTROU KERBANALEK

Mes selaouit mad c'hoaz. Pa velo koummandant
Kastel e vezo kelc'het evelse ganeomp, kredabl e
rei d'he zoudardet saïlla varnomp pe var ar re zo e
tosen Fantik, gant ho baïonnettez... Arabad tec'hat
neuze avad ; mes mont a benn herr varnho ha
skei muia ma c'hellot gant ho feier, ho filcher.

AN OLL

Ober a reimp, aotrou, bezit dinec'h.

AN AOTROU KERBANALEK

Epad an emgan me a ielo euz an eil banden d'eben, d'ho kelen ha d'ho kennerza. Mes, klevet a rit ? Senti trum a rankoc'h avad.

AN OLL

Toui a reomp e sentimp var ar ger !

UNAN DEUET EUZ AR STANG

Salud, va c'hoummandant.

AN AOTROU KERBANALEK

Ac'hanta penaoz e za an traou ?

Braoik awalac'h avad. En em guzet oamp en eur c'hleuchad lan a zioc'h kanol maner ar Stang. Prest goude ma oamp en em gavet, e velomp eun tregount soudart benag en eac'h ar sao : ac'heo, eme-ni, ema erru ar ganfarted. Pa oant en em gavet a zindan tenn, Ian Bennorz a griaz a bouez he benn : Tan var ar ganaillez-man. Ha kerkent avad hon ugent fusul a granchaz varnho.

AN AOTROU KERBANALEK

Unan benag o peuz diskaret ?

A me gav d'in, pemp den hag eul loan zo choumet var an hent braz, eun all a ioa choumet a ispill he varc'h, eun troad d'ezhan er skleuk hag he benn o ruza ouz an douar.

UNAN IAOUANK

Bac'had varnho.

Ar re-all, leun-c'hoat ive, a ieaz d'an daou-lamruz varzu Kastel en eur grial evel viltansou : O va

breac'h, eme unan, o va gar, eme eun all. Mes prest da c'houde e velchomp eur vanden-vraz a zou-dardet, ha daou bez kanol. Tenna a reont a gleiz hag a ziou, mes ho zennou ne reont nemed dibenna lan ha balan, ha ne reont droug ebet deomp-ni.

Va c'hamaraded zo eat a dreuz ar goaremmou d'ho gortoz vardro Kroaz-Vean. Ar zouardet a deu goustadik, goustadik, en eur furchal a gleiz hag a ziou, mes dont a reont atao goulskoude.

AN AOTROU KERBANALEK

Mall eo deomp-ta diblas. Deomp dioc'htu da gaout ar re all, peb hini en he blass, peb hini en he vanden. Alo, potred, beac'h var dud difeiz ar C'halvados, ha var Canclaux.

AN OLL

Ia, ia, bac'had dezho.

AN AOTROU KERBANALEK

Hardi potred ! Deomp da skuill hor goad, evit Doue, evit hor bro, evit hon tud.

Kana a reont :

Hardi potred ! oll vretouned var zao !
Vit hon Doue stourmomp atao.

Oll a unan : Leon, Treger, Kerne.
Evit hor Feiz, al liberte.

Lavaromp oll euz a bouez hor pen :
Kristen da viken, kristen da viken.





PEMPET ARVEST

Er memez leac'h

C'hoarierien :

TAD KOZ.

Daou zoudard.

JAKEZ den oajet.

IAN.

HERVÉ.

BIEL.

KOULM, douget var eur fusul.

PAOLIK.

PAOL KERAERET, ha tri pe pevar all, o tougen Koulm.

JOB, unan euz ar re a zouge Koulm.

TAD KOZ

(*Trist meurbet, azezet*). Peder heur sounet, ha n'euz deuet kelou ebed c'hoaz euz an emgann. Goulskoudé abaoe teir heur ne glever ket a dennou kanol. Chèchus, chèchus ! daoust ha ne joumo ket oll c'hoazet ar vro-man var dachen Kergidu hirio ! (*Trouz a glever*). Sell, erru e zeuz unan benag. (*Daou zoudard a deu gant herr en ti, en eur eja ha dieja hunan koz*).

UNAN EUZ AR ZOUDARDET

Aneval.

AR ZOUDARD ALL

Ni da zesko da ober goab euz a botred ar C'halvados.

AR ZOUDARD ALL

(*En eur zellet ouz an Tad Koz azezet*). Sell, setu aman ar c'hagn goz all ive. Ne ket te e peuz roet digemer d'ar C'herbanalek ? Ne ket en da di-te, en noz tremenet, eo e bet prepalet an emgann ?

(*An Tad Koz heb lavaret ger a zoubl he benni*). (*Ar zoudard eun neubeud goude*). O ! ne dal ket ar boan did klask nac'h, rampok koz, ni on deuz klevet gant ar Goarant a zo lakeat da bersoun aman gant ar Republik. Hen a zo bet o tiskuilh a'hanot deomp. Ah ! ridet koz, an dra-ze a gousto ker did paot ! Ni zo o vont d'ho lakat da zansal en ear ; rak ne garfemp ket sklabeza hor c'hleze gant goad chatal evelloc'hui. (*Lakat a ra he gleze er feur*). Greomp ar stal ouz heman da genta. (*Neuze Tad Koz a ia d'an daoulin hag a lavar he japeled*).

(*Epad ma ra ar zoudarded ar skoulm er gorden, Jakez a ra ar beden-man var he zaoulin, he zaouarn kroazet, he zaoulagad savet varzu an env*) :

JAKEZ

O. Doue galloudek-ha truezuz meurbed,
C'houi eo o peuz krouet an envou hag ar bed ;
Digaset var an douar ho mab, an Eil Fersoun,
Da vervel evidomp, da baea hon ransoun.
Ar profet bras Daniel c'houi o c'heuz diouallet
Dioc'h skilfou ha dent al leonet kounnaret
« E kear Babylon C'hui o peuz prezervet
» Tri Inosant santel e kreiz eur fourn c'horet.
» Ar bobl a Israel, Moyses, Aaron,
» Sklavourien reuzeudik dindan eur Pharaon »
» A c'hellas — gant sikour ho preac'h gallouduz --
» Tec'hat euz an Egypt ha treuzi ar Mor ruz.
» Dalc'het ho peuz beo Jonas en eur balen :
» Breman ive va Doue, selaouit va feden.
» Jesus va Zalver, ouzin sellit a druez

» Pe evit va c'henvroiz kemerit va buez. »
(*Pie ma Jakez oc'h echui he beden e figouez pevar pe pemp euz a botred Kergidu, mac'hagnet oll. Ar zoudardet a red kuit dre an tu all en eur grial*) Ah ! (*Unan anezho a lez he fuzul. Potred Kergidu a red var ho lerc'h, nemed unan a joum da ziskrouga Jakez*).

IAN

Penaoz o deuz kredet ar ganaillez-se dont aman euz a Gergidu ?

JAKEZ

Ar re-ze n'int ket bet e Kergidu. Choumet oant eun ugent soudart e Kastel da lakat evez. Ha kerkent ma zeo loc'het an dud er mintin-ma, ar Goarant zo redet da Gastel.

IAN

Me zouete petra 'vije en em gavet. Lavaret em oa lakad unan benag da ziuual ar presbytal. Gouzout a rit Marc'harit an Teven ha Barba Corr a vez bemdez er presbytal, ha gant an diou-ze ar persoun fall a c'hoar petra rear ha petra leverer er barrez. (1)

JAKEZ

velse zo erruet. Kerkent ma zoc'h diblasset er mintin-man-ta, ar Persoun-Judas zo eat da gaout ar zoudardet. Alo, potred, eme an treitour, deuit unan pe zaou ganen-me, ha me lakei etre ho taouarn ar marmouez koz en deuz roet digemer da Vestr hoc'h enebourien en noz tremenet. Dizoursi e c'hellit beza, vandro bourg Plougoulm n'euz breman nemed eur

(1) Tennet euz Isor, an Antron Tanguy.

ruzer koz benag, ar c'hoazed all zo eat oll d'an emgann. P'edont o tont euz ar presbytal me ioa just o tremen : Sellit, eme ar Goarant, setu aze c'hoaz unan euz ho prassa enebourien. Kerkent an daou zoudad a lam varnhon evel bleizi ; hag hentchet gant ar Lelek treitour e treinont ac'hanon aman.

(*Biel ha re all o tont gant heñr*).

BIEL

Evit perc'hen ar c'hepi-ze evelato ne lazo ket ken a vretouned. (*Banna 'ra ar c'hepi var an daol*).

IAN

Ac'hanta, gellet o peuz ho faka ?

BIEL

Unan anezho zo aze astennet e park an Tilosket. Egile en deuz gellet tec'het, rak hini ac'hanomp ne c'helle galopad var he lerc'h.

TAD KOZ

Va Doue ia, gullet a ran e zoc'h oll goall lakeat. N'euz ket lazet kals a dud da vihana ?

BIEL

Lazet mord ne gredan ket e ve eun niver bras, mes goall c'hlazet e zeuz kals avad.

TAD KOZ

Mes, ha Koulm pelec'h eo choumet ? (*Den ne lavar guer*). Maro eo sùr oun !

BIEL

Ne ket, ne ket, Jerom. Evit ma viot dinec'h goulskoude e lavarimp deoc'h arabad beza var c'hed anezhan en derveziou-man.

TAD KOZ

Pas en derveziou-man zoken ?

BIEL

Nan, rak ar re zo da denna d'ar zort zo eat gant an aotrou Kerbanalek da goajou Kermenguy.

TAD KOZ

D'ober petra ?

BIEL

Evit sailla adarre kenta ma c'hellint var an dispac'herien.

TAD KOZ

Va Doue, va Doue, gullet a reot, lazet e vezimp oll gant potred ar C'halvados.

BIEL

Gant potred ar C'halvados ? Ar ganfarted-se da vihana anez Canclaux a vije choumet oll e Kergidu hirio.

TAD KOZ

A gav d'eoc'h.

BIEL

A ia avad. Pa oue freuzet mad ar pont e oue lavaret deomp-ni ober an neuz da zisken d'an traon, evel pa or biche c'hoant da dec'hat ; ober a rechomp ; hag ar zoudardet avad gant herr var hor lerc'h. Kaout a rea d'ezhone oa ken nemed hon drailla da ober. Mez ne ket an dra-ze a c'hoarvezas. Lod euz ar re a ioa kuzet adren. Kervren ha Kerigou a dreuzas an hent bras evit mont da Loelouar ha da Benn-an-Traon. Er c'his-se oa trouc'het hent Castel

ouz ar zoudarded ; ne oaint ket evit dont var ho c'hiz
peguir ni a ioa var an adren hag en daou du ; n'oant
ket evit mont araog, rak freuzet oa ar pont. Kalc'het
oant eta ganeomp. Red oa dezho beza lazet pe pri-
zouniet ganeomp-ni, pe beza beuzet e kanol Kergidu.
Mes ho c'habiten a velas buan oa lakeat er zac'h
gant an aotrou Kerbanalek. Anaout a rea he vicher,
ha setu perak e roaz urz d'he zoudarded da gass
ac'hanomp kuit euz a Dosen Fantik. Eno en doa
c'hoant lakad he ganoliou evit gellout tenna varnomp
a bep tu, varzu Begavel ha Pen-an-Traon, kerkouls
ha varzu Kreac'h-Moiek, Kerigou ha Kervren.

JAKEZ

Ac'hano avad e c'helfe douara ac'hanoc'h. Ne
ket sot anezhan.

BIEL

Sot, o nan. Lavaret a reaz-ta d'he zoudarded, evel
deac'h e Kastel : « Alo, mignoured, ar vaionettez e
beg ar fusul, hag evel deac'h e Kastel, saillit varnho !

Pa velaz an aotrou Kerbanalek anezho o trei
varzu ennomp e kriad a bouez he benn : « Araog
potred Breiz, a benn herr var ar revolutionerien !
Dalc'hit sonj mad ec'h en em gannit evit ho Toue,
ho tud er gear, hag ho pro ! Kaloun-ta, va breu-
deur ha bac'had dezho. »

JAKEZ

Setu aze komzou hag a ia betek kaloun eun den.

BIEL

Ar c'homzou ze e guirionez a lakeaz hor goad da
virvi muioc'h-mui. Eleac'h tec'hat ez eomp a benn
herr var ar zoudarded. Ar re o doa fuzuliou a denne
hag a ziskare ho den bep taol. Ar re n'o doa nemed

freier, eskennou prad pe filcher a lamme var ar
sitoianet evel leoned kounnaret.

JAKEZ

Malis a ioa evel-kent !

BIEL

Malis ? Sur eun e neb leac'h ne oue morse en
em gannet gant muioc'h a himor. Ne glevet a bep
tu, nemed ar c'hri-man : « Beac'h d'an dud fall ha
dizakret ! Dalc'h-mad 'ta Yan, toulgof anezhan 'ta
Per, torr he benn outhan 'ta Jakez ! » Ar zoudarded
a joum mantret dirag kement a ioul. C'hoant o deuz
da vont kuit mes n'int ket evit tec'het, kalc'het
neat int ganeomp. N'int ket evit mont varzu Ber-
ven, rak freuzet eo ar pont. N'int ket ken neubeut
evit diztrei da Gastel, rak ni zo var an hent braz hag
en daou du dezhan.

JAKEZ

Sac'het oant ganeoc'h avad.

BIEL

Kaout a rea d'eomp oa great gantho. Disken a
reont atao, mont a reont da guzat adren maner
Kergidu. Mez ni a zaill atao varnho goassoc'h goaz.
N'emaint mui tri c'hant paz dioc'h ar ganol, emaint
o vont da veza beuzet... Mez allas !!!

JAKEZ

Ha petra ?

BIEL

En eun taol e velchemp hent Berven goloet a
dud.

JAKEZ

Piou oant ?

BIEL

Piou ? Soudardet Lesneven, hag ar general Canclaux en ho fenn.

JAKEZ ha TAD KOZ

Ah !

BIEL

Kerkent ha m'hor guelaz e lakeaz he ganoliou var lein ar grec'hen evit skei varnomp. Neuze avad e ouemp goall lakeat. Skei a reant dreist soudardet Kastel var dosen Fantik, var an hent braz hag e peb tu.

JAKEZ

Chè !

BIEL

Ha petra c'hellemp-ni da ober gant hon neubeut fuzuliou a eneb kanoliou hag a skoe keit all ?

JAKEZ

Petra c'hellec'h da ober ? Tec'hat ive sùr, ha netra ken.

BIEL

Ia siouas, red e oue deomp tec'hat. Rak ma vichemp choumet e leac'h ma edomp. Canclaux n'en doa nemed tenna varnomp da ober, evel tenna d'ar guen.

JAKEZ

Paour keaz breudeur !

BIEL

Hag ouspen, Canclaux zo paot fin. Sonjal a rea, kredabl zoken en doa klevet oa freuzet pont Kergidu ganeomp. Ha petra reaz ? Digass er c'har-rat plench gantha. Kerkent a ma velaz ac'hanomp-ni o tec'hat e tiskennaz varzu ar ganol, hag ar plench a bake just an daou du d'ar ganol. Treuzi a c'hellont eta, ha setu breman soudardet Canclaux en em gavet gant re Gastel ; Canclaux a goumand varnho oll hag a ra dezho pignat dre an hent braz hag ar parkeier betek Begavel ha kreac'h-Moiek.

JAKEZ

C'houi a deuz d'ar gear neuze ?

JAKEZ

D'ar gear ? o nan evelato. Arabad d'eoc'h sonjal or boa-ni troet kein en eun taol evit guelet kement a zoudardet o tont varnomp. An aotrou Kerbanalek en hor c'hreiz a ziskoueze deomp penaoz en em ganna, a goumande, a gennerze ac'hanomp ; hag e parkeier Kervren e oue eur c'hrogat euz ar re starta. Me gred en douarou-ze e vezo guiniz mad er blâ-ma rak trempet mad int gant hor goad-ni.

JAKEZ ha TAD KOZ

Chè !

JAKEZ

Kals ac'hanoc'h a zo mac'hagnet.

PAOL KERAERET

Evidon-me zo treuzet va morzod gant eur voulet.

HERVE

Me zo treuzet va breac'h e daou leac'h.

EUN ALL

Me zo eun toul e kern va fenn kement a va dourn.

JAKEZ ha TAD KOZ

Chè !

TAD KOZ

Digollet e viot, va mignouned. Evit ho religion eo o peuz stourmet. C'houi a zo merzerien, ha Doue ho pao !

BIEL

Me evit va lod em euz bet eun taol baionnettez e va c'hof gar. Mes an hini en deuz roet an taol-ze d'in hennez avad ne zaleaz ket da vont d'ar bed-all.

JAKEZ

Ah !

BIEL

Eur roscoat iaouank em c'hichen a dorraz he benn outhan gant eun tol krok. Va goad-me evelato a rede puill ive ; chaflika a rea, atao e ra zoken, em boutou. O velet ar goad o tiredet euz va gar hag o strinka euz va boutou eur vaouez a griaz varnhon : « Deuit a gostez eun tam-ta, ma lakin eun tam lienn da arreti ar goad. »

TAD KOZ

Merc'hed a ioa en emgann ive ?

BIEL

Merc'hed ? O ia, kals muioc'h eget deac'h e Kastel. Micher ar merc'hed guir eo, ne ket beza o vrezelekad gant ar zoudardet, mes e Kergidu n'oa ket ar memez-tra, eno n'oamp nemed tud euz ar vro, en

em zestumet evit difen hor feiz hag hon tud ; hag ar merc'hed-ze en hon touez a ioa evel pa vichent er gear.

JAKEZ

Kals servich o deuz rentet deoc'h, cuir ?

BIEL

A me gav din ! Epad an emgann, pa velent unan benag diskaret ez eant dioc'htu d'hen destum. N'o doa aoun na rak an tennou na rak ar vaionnettez. Digas a reont gantho an hini mac'hagnet, ha goude beza lienet dezhan he c'houliou, ma ne c'helle ket bale, hen dougent var eur c'havaz, pe en eur gar-rigel. Nan, her lavaret a ran, ne oufe den, nemed her guelel en defe, anaout ar vad a reaz d'eomp ar merc'hed deuet da heul ho zud euz a Blougoulm, Kastel, Enez-Vaz, Plouenan ha kals parresiou all. Ouz ho guelet e teuaz sonj d'in euz ar zantez en deuz saveteat ar Frans breman zeuz tri c'hant vloas hantter. Mad, kredi a ran e c'hellan lavaret hirio o deuz merc'hed Breiz-Izel kement a feiz hag a galoun a Jann-Darc.

PAOL KERAERET

E guirionez ne ket ebken soigni ar re c'hlazet a reant. Rak me va unan em euz guelet diou blac'h iaouank euz a arvor Kleder o rei he gampan da eur zoudart.

BIEL

Eun dudi oa guelet ho himor.

PAOL KERAERET

Hag ar veleien-ta pegement e poanient da zikour ac'hanomp he peb fesoun !

JAKEZ

Beleien a ioa ive ?

PAOL KERAERET

Ia, eur maread. An aotrou Kure a ioa ive zoken. An aotrou Breton, persoun Sibiril, an aotrou Crenn, kure Guinevez, an aotrou Goachet, kure Guitevede, ha meur a hini all.

O ! ma c'houesfe an oll dud pegement a blijadur a ra da galoun eur zoudard kristen kaout eur beleg en he gichen var he dremenvar ! Ma c'houezfet an dra-ze, klaoustre ne vije ket kement a c'hloubous gant lod divar benn ar veleien ? Kriz eo e guirionez mervel e kough eur park, e kreiz ar vouillen pe an erc'h, eur vouled er penn, pe ar memprou bruzunet. Nag e ra vad neuze kaout eur beleg en ho kichen hag a lavar deoc'h : « Bezit dinec'h va breur, ho pec'hejou zo pardounet. Doue a zo mall gantha ho tigemeret en he varadoz, rak mervel a rit evit ho Feiz hag ho pro. » Ha pa deue lagad an tremenvar da drei varzu ar gear, ar belek a c'houie petra a felle dezhan hag a lavare c'hoaz : « Ia, ia, va mignoun, ho kompren a ran. Me a ielo da lavaret d'ho mamm kenavo er baradoz evidoc'h. »

JAKEZ

O ! komzou dudiuz, komzou an env !

PAOL KERAERET

Ar c'homzou-ze e guirionez a skuill nerz ha zoken eun tam levenez e kaloun an tremenvar, a vel neuze, heb aoun ebet, ar maro o tont d'he skei pell diouz he gear.

TAD KOZ

Guela a rankan ouz ha klevet, Paol Keraeret.

PAOL KERAERET

An neb ne ket bet en emgann ne c'hello biken koumpren petra eo an den paour e kreiz an tan, He zaoulagad a luc'h en he benn evel daou gef tan, an eonenn a zo e korn he c'hinou, he fronnellou a zo digor hag a deu evel moged anezho, he gorf abez a gren gant he herder ; dialanet eo, ha goulskodue ne ehan da reded ha da skei pa gaf he du. Evel p'en defe kollet he benn. Lod a lavar c'houez ar poultr eo a ra kement-se. Goulskoude guechal, araog ma ioa poultr, fuzulioù ha kanolioù ec'h en em gannet gant kement a gounnar ha bremañ. Mes evidon-me a gav din, guir, em boa kollet va fenn, n'emoa aoun rak netra, ne rean van a netra. Guelet a rean tud, hag a anavezen mad zoken, astennet var an douar, mac'hagnet, hag ez ean abiou d'ezho evel pa ne vichent ket eno, va c'haloun a ioa deuet da veza dir. N'em oa ken ioul nemed diskar ha laza dispac'herien muia ma c'heljen.

Goulskoude kaer orboa en em ganna gant kaloun n'oamp ket evit herzel ouz ar zoudarded. Bremañ oant marteze ouzpen eur mill, armet mad, hag en em ganna a c'houient ive guelloc'h egedomp-ni, red eo hen anzañ. Senti a reamp evit guir, evelato kals o doa c'hoant da ober ho fenn ho-unan, hag er c'hiz-se ni vichent ket kavet el leac'h m'oa izoum anezho. Ouspenn, bremañ ar c'hanolioù zo savet huelloc'h c'hoaz, betek ar C'herigou, hag ac'hano e touarent ac'hanomp evel c'hoari... Kollet oamp eta, siouaz, anat oa... Neuze an aotrou Kerbanalek a lavaraz deomp : « Va Mignouned ker, kountant braz oun ac'hano, ha n'em bije kredet biken ho pefe bet stourmet gant kement a galoun. Mez ar zoudardet zo re niveruz. En em virit eta abenn eur vechall, hag it bremañ oll d'ar gear. Pa vezo red me ho kavo adarre. »

JAKEZ

Ia, ia, bac'had dezho adarre ar c'henta possubl.

PAOL KERAERET

Ha c'houi, aotrou Kerbanalek eme ni, petra reot ?

Me, emezhan, a joumo e kuz aman hag ahount, el leac'h ma kavo din e vezo an essa koueza var Canclaux hag he zoudardet.

Ni a joumo ive, eme an oll adarre.

— Nan, nan, it d'ar gear, eme ar c'habiten.

— Ne zeimp ket, eme-ni adarre.

— Va Breudeur ker, emezhan neuze gant douster, tridal a ra va c'haloun ouz ho klevet. Lakeat o peuz eta start en ho penn difen betek ar maro ho Toue, ho tud, hag ho pro ?

— Ia, ia, eme ni, betek ar maro.

JAKEZ

Setu komzou hag a blij din.

PAOL KERAERET

Mad, emezhan neuze, pe guir ne fell ket deoc'h a briz ebet va lezel va unan, e talc'hin ganen ar botred iaouank zo galvet da denna d'ar zort. Ar re-ze, e guirionez, ma ne jommont ket ganen-me a vezo kasset da bel bro, hag a vezo klasket ho lakad da ober al labour udur a ra pôtrede ar C'halvados dre aman. Mes ar re all avad mont breman d'ar gear ; rak red eo gounit bara d'ho pugale ha d'ho tud koz. Soublit ho penn goazed, ha sentit ouzin.

TAD KOZ

Da beleac'h eo eat Koulm breman neuze ?

PAOL KERAERET

Da goajou Kermenguy. Araog kimiada an aotrou

Kerbanalek a lavaraz c'hoaz d'eomp : « Me m'euz sonj en em denna gant ar re iaouank-man e koajou Kermenguy. Eno e vezimp etre Plougoulm, Sibiril, Cleder, Plouescat, Guinevez, Sant Vouga, Guitevede ha Plouvorn. Ma ne c'heller ket digas bevans ha ke-leier deomp diouz eun tu, e vezo gellet diouz eun tu all. An aotrou Kermenguy n'ema ket er gear evit guir ; rak, evel a c'houzoc'h, ranket en deuz tec'hat da Vro-Zaoz, abalamour m'en doa roet skoazel d'an Aotrou-n-Eskob da gemeret an teac'h. Mes kemennet mad en deuz he vevelein, hag ober a raint evidomp ar pezh a c'hellint. Alo, mignouned kalounek, emezhan neuze kenavezo ar c'henta, ha Doue ra vezo ganeoc'h ! » — « Kenavezo, kabiten karet, eme-ni, ha po pezo izoum sikour, digassit kelou deomp trumma ma c'hellot. » — « Ia, ia, emezhan, en ober a rin. »

TAD KOZ

Ia petra rea Canclaux epad an amzer-ze ? Ne zeaz ket var ho lerc'h ?

PAOL KERAERET

O nan ! Ar zoudardet, a c'hellit kredi a ioa ker kountant ha ni da ehana. Canclaux, pa velaz ac'hannomp o tec'hat a zestumas he zoudardet var an hent braz, evit mont kenta ma c'hellje varzu Kastel. Rak aoun en doa ne c'helje ket en em gaout e kearaog an noz. P'edomp o tont d'ar gear, edo ive ho rejimant o tiblas.

(Trouz a glever. Koulm douget gant daou pe d'ri a zigasser en ti. An oll a zell, ha goude e tiztroont ouz Tad Koz, en eur zellet truezuz). (Tad Koz, araog ma vel he vab). Piou zo en em gavet aze ? (Pa vel he vab ez a trumma ma c'hell da boket d'ezhan). O va vab, va mab ker !... Han ! ha c'houi lavaret d'in n'oa ket zoken glazet Koulm.

PAOL KERAERET

N'oa ket ive pa zomp-ni deuet kuit.

JOB

Nan, guir eo. Mez da c'houde m'eo deuet ar re-man d'ar gear ni zo eat eun daou ugent benag a dreuz ar parkeier varlerc'h Canclaux betek Kermorus. Tenna a reomp var ar zoudardet, a denne ive a ziou hag a gleiz etouez ar c'heuneud. Ha just pedomp erru kuit Koulm a oue tizet gant eur voulad.

TAD KOZ

Paolik zo eat da gerc'hat ar zaout da bark ar Varquez, it da lavaret dezhan dont buan d'ar gear. (*Perik a deu en ti*). Ema o tont. Sell Paolik petra zo en em gavet gant Koulm !

O ! Koulm zo lac'het ! ! ! (*Gouela 'ra*).

AR RE ALL

Ne ket, ne ket Paolik.

PAOLIK

(*En eur ouela dourek*). Tata zo maro, mamm zo glazet, ha prestik n'em bezo breur ebet ken ive ! O ! ! ! (*En eur ouela atao*).

KOULM

(*Koulm a zigor he zaoulagad, a lavar en eur huanada*). Paolik, ha c'houi Tad Koz, na ouelit ket. Koveseat, kommunit ha nouet oun bet gant an aotrou Kure.

JOB

Ia, ia, Jerom. An aotrou Kure a ioa an aotrou Doue ganthan en eur voestl arc'hant en he gerc'hen hag en deuz roet he zakramanchou dezhan er Stank.

KOULM

Bolontez Doue... ra vezo... great. Laouen oun o rei va buez evit difen va Feiz ha va bro. Lavarit da va mamm... kenavo er baradoz evidon. Eno ne vezo mui a zisparti etrezomp ; ha da c'hortoz, euz ti an aotrou Doue e rin marteze muioc'h a vad deoc'h eged n'em befe great o chom ganeoc'h. Kenavo In-troun-Varia Prat-Koulm ! Dirazoc'h em euz pedet meur a veach ; c'houi eo va mamm, digorit breman d'ho pugel dor ar barados ! Va Jesuz, kinnig a ran deoc'h... va foanion evit va fec'hejou. (*Koulm a zer breman he zaoulagad, hag en deuz lavaret ar c'hom-zou-ze oc'h en em arrêti aliez, hag en eur bokaf d'he grusifi*).

IAN

Pebez kroaz evelato evit an ti-man.

HERVE

Ia, te lavar, den mui da gas an tiegez en dro ha da c'hounit bara.

PAOL KERAERET

O gouarnamant kriz ha dizoue ! Nag a zaelou hag a c'hoad a lakez da redet ! Mes, kaer e pezo, ni a servicho Mestr an env hag an douar, a zento ouz hon Tad a zo en env.

(*Unan a deu*). Tremenet eo !

AN OLL

Tremenet eo ? ? ?

(*Ar memez hini*). Ia, siouaz, Doue d'hen pardono.

PAOL KERAERET


Mad, va mignoured, araok mont d'ar gear, lava-
romp eun « de profundis » evit ma plijo gant Doue
reseo dioustu en he varadoz an hini en deuz he
garet betek ar maro ! Taolomp eur banne dour
benniget var guella paotr iaouank a ioa er barrez.

Echuet d'an 22 varnugent a viz here 1913.

JAKIG KERIDU.



TAOLEN



pajen

Kent-Skrid.

Lizer an Aotrou Le Duc, chaloni.

Arvest kenta	1
Eil arvest	17
Trede arvest	31
Pevarad arvest	47
Pempet arvest	65

